

Journal

BRUD

ar yez hag ar vro

(Embannet beb tri miz)

Komanant-bloaz	15 F
Komanant-skoazell	20 F
Studierienn, Soudarded	10 F
n niverenn	4 F

Sekretour : P.-M. MEVEL, 14, Breiz-Izel, Brest (Tél., Brest 44.49.40)

Merour : GI. MILLOUR, Morlaix (N. Fin.)
C. C. P. 1540-43 Rennes

Strollad Harperien " BRUD "

Eur strollad HARPERIEN BRUD a zo bet diazezet.

Ne ra ar strollad-se nemed kregi gand e labour, a vo rei skoazell da renerien ar gelaouenn ha dastum tro-dro da homañ brezonegerien niveruz hag oberiant, tud a beb kostezenn hag a beb oad.

Setu amañ roll ar genec'ed oh ober bodad-rena ar strollad.

Gw. BERNIER — Y.-B. AR BERR — A. BOCHÉ — Ch. BRISSON —
F. DANNO — Y. AN DU — Y.-B. DUVAL — B. ELIÉS — Ch. AR GALL
— H. GOURMELEN — P. HÉLIAS — P. HONORÉ — A. KÉRAVEL —
P. hag A. LAVANANT — Dr. Ch. LAURENT — Y.-GI. LÉON —
P.-M. MEVEL — GI. MILLOUR — G. AR MOAL — F. AR PERU —
E. PERSON — L. ROPARS — V. SEITÉ — Dr. J. TRICOIRE.

Evid emezellia e « Strollad Harperien Brud », kas eur prof ouspenn ar homanant-bloaz da Verour « BRUD ».

Kaset e vo kelou d'an izili diwar-benn bodadeg kenta ar Strollad.

Brud

ar yez
hag
ar vro

Niv. 16

GENVER 1964

TAOLENN :

● Kôziou Titin Mari,	
gand E. AR BARZIG.....	3
● Labour evid ar brezoneg :	
Er Helaouennou	41
Kenstrivadegou-Skol	44
C'hoariva ..	45
Lizer " Emgleo Breiz "	46
Kevredigez Etrevroadel.....	47

KÔZIOU TINTIN MARI

(Kontadennou a Vro-Dreger)

gand

Ernest AR BARZIG

(Loread Kenstrivadeg "Emgleo Breiz" 1962)

« Ne vez ket lennet brezoneg gand ar bobl dre na
vez ket roet he brezoneg d'ar bobl da lenn. »
(Lennet ganin en eun tu bennag ha sanket don em spered.)

Penherez an Ti-Houarn

Kinniget d'am mab Erwan.

- Tintin Mari, kont din eur gôz 'ta...
- O, mabig, lôsk ahanon, skuiz eo ma fenn...
- Unan vihan, tintin Mari, unan verr.
- Hemañ a zo eun torr-penn, memez tra Doue evel e dad pa oa d'an oad-se.

Red mad e veze d'am zintin goz, goude beza lakêt diou pe deir skilienn war an tan, kregi gand he hontadenn, n'eus forz pegement a ziegi he-deveze :

« Eur wech e oa,
Eur wech ne oa ket,
Eur wech e vo,
Eur wech ne vo ket,
Hag eur wech e vo bepred...

- 'Hanta, mabig, ez an da gonta dit :

PENHEREZ AN TI-HOUARN

Gouzoud a rez, pôtr bihan, peleh emañ an Ti-Houarn : eur maner koz eo. Gwechall, n'ouzon ken pegeid zo, e oa aze eur benherez pinvidig, Godig heh ano, o chom gand he zud. Tud vad a oa ar re-mañ, med tost eun tammig, marteze, ha techet d'ober o labour o-unan, kuit da gemer mitizien. Ha pan ez ê he zad hag he mamm díouz ar gêr, e veze red d'ar verh menel heh-unan er maner.

Eun devez bennag, ez eas Erwan an Ti-Houarn hag e wreg da foar ha pardon Gwengamp, goude beza lavaret d'o merh :

- Godig, m'az-pezh doan da-unan, lavar da Janig Kerverzod dond da gousked ganit.

- Hag e rin, eme ar plah yaouank ne jomin ket amañ ma-unan-penn.

Da vare serr-noz, ez eas ar benherez beteg Kerverzod ha, goude beza klakennet eur pennadig, e teuas an diou gamaradez d'an Ti-Houarn. Díouz tól en em lakajont da zebri o hoan, ha

kôziou endro ! Janig a oa troet da gad ar gwele-kloz en em gave e-tal an oaled. A greiz-oll, e paras he daoulagad war eur re-votou-koad melen, a oa e penn ar gwele-ze.

- Botou-koad melen, a zoñjas plah Kerverzod, botou-koad aotrou ! En Ti-Houarn n'ez eus den ebed o lakâd a seurt-ze... O, Itron-Varia, Godig penn-skañv he-doa lôsket he dor digor... Me a zo sur ez eus eul lêr bennag d'indan ar gwele. Ez an da skarza ahann.

Ha Janig da harmad ouz he mignonez azezet keñver-ouz-keñver : « O Godig gêz, me am-eus poan... O ma hov ! Red eo din mond d'ar gêr...

- Gand eun dakenn dour tomm e tremeno da zroug-kov... N'ez ket da lezel ahanon va-unan.

- Geo, plah kêz, red eo din mond, n'eus nemed mamm a gement a oar para ahanon pa vezan evelse.

Ha Janig Kerverzod kuit evel ma vije bet krog an tan e lostenn he hiñviz.

- Ma, eme Godig d'he haz bihan, Fistoulig a zeuio da gousked ganin, lakeda bichig ?

Prenna a ra dor an ti, sevel a ra gand an diri hag hi d'he hambr.

Eur pennadig goude ma oa êt d'he gwele, e klevas kerzed en traoñ ha kerzent eur vouez gwaz o huchal dezi : « Kousket out ? Kousket out ? »

Mabig, darbet e oe d'ar benherez trelati, med, a drugare Doue, ne gollas ket he fenn ? 'N em lakâd a reas da zirohal evel eur broh...

- Kousket eo an dimezell, eme al lêr, ez an da aozo koan d'am henseurted a ya d'erruoud bremaig, ha goude e vo gwelet petra a vo d'ober amañ.

Ar benherez a glevas anezañ o tigeriñ ar ganastell hag o frit a eur bern viou war ar billig. Dirohal a rê ar plah, med prederia a rê ivez : « Bremañ souden, emezi, e yelo al lampon er-mêz da hervel e geneiled, n'e-neus ket poazet kement-se a viou evitañ e-unan. »

Ha Godig d'en em wiska.

Hervez he zoñj e tremenas an abadenn... Pa glevas an nor o wigourad ha korn-boud mestr al leron o son, e tiskennas prim ha prim. Hag hi da voraili pikol dor ar maner ha da lakâd a-dreuz ar sparl koz, eur pezh tamm koad dero, mabig ; e-giz-se e veze prenet an dorjou gwechall.

Pa fellas d'al lêr braz distrei d'an ti, e chomas e fri war ar gloued. A ! pôtrig, m'az-pefe klevet anezañ o toui-Doue en eur êsa addigeri an nor :

- Trutell daonet, digeri a ri an nor-ze pe ne ri ket ?

- Mardouen, ne rin ket, gelloud a rit gortoz, eme Godig, deut eun tamm hardison dezi.

Eul le-Doue pe daou a zeuas hoaz gand ar pez-divergont ha neuze e lavaras d'ar benherez :

— Ro din da vihanna ma bouhal a zo chomet war an dôl !

— Ya, ya, ho peadra a vo rentet deoh, Aotrou ; tremenit ho torn etre barennou houarn ar prenestr, mar plij.

Ma oa fin al lêr, ar plah yaouank ne oa ket sod kennebeud. Ne oa ket peurlakêt gantañ e zorn kleiz war vord ar prenestr ma skoas Godig eur flipad gand ar vouhal. Eur youhadenn ! Daouhanteret he-doa kempenn ha brao bizied al lakepod. E vignoned, erru d'an ampoent, a gasas anezañ gante dioustu etrezeg koad Kervezan, med huchal a reas arôg :

— Te a bêo ze din !

Godig a dremenas ar peurrest euz an noz e korn an oaled o ouela hag o huanadi, liou ar maro en he herhenn, spontet gand pez a oa o paouez ober. Pa oe savet an heol, ne gredas ket ar plah yaouank mond er mêz. D'an abardeiz, pas dosteas charabañ Erwan an Ti-Houarn ouz ar gêr e oe bamet, e itron hag eñ, o klevet ar chatal o vlejag hag o c'hwirinat : ar paourkêz loened a gave treud ar geusterenn.

Tud Godig a oe mantret gand pez a gontas dezo o merh :

— Ken prim all, eme an tad, or-befe kavet ahanout maro ! Na rez ket gwad fall, ne vi ket lôsket ken da-unan, nag e vi.

... Eun toullad miziou goude. Penherez an Ti-Houarn he-doa ankounahêt pell a oa mestr al lêron hag he zôl bouhal. Abaoe eur zizunvez e oa troet he zoñjou gand eur pôtr yaouank, hag unan a-zoare, eun darin a hini, n'eo ket eur Yann Gouer ! Eur pôtr koant ha gwisket faro, botou-ler ha manegou gantañ bemde. Kemeret e-noa pañsion, emezañ, e brasa ostaleri kêr Ar Roh. Bet e oa klañv hag ar vedisined o-doa gourhemennet dezañ eva kalz a lêz. En Ti-Houarn e oa bet prometet eur podad bemde dezañ. Kalz arôg ma veze goroet ar zaout e errue an aotrou. Da hortoz, e plije dezañ marvaillad gand Godig. Homañ e veze lorh enni ha 'n em domma a reas buan ouz ar pôtr yaouank-se a zeblante beza sod ganti. P'en-devoe hemañ kontet lalaig dezi pell awalh, e houennas diganti dimezi. Med Erwan an Ti-Houarn a yeas teñval e benn ouz goulenn e verh :

— Paourkêz genaouegez, eme aze o rei ton d'eur pôtr ha n'anavezez ket, eur reder-e-revr bennag na-neus na kar na killorou er vro ; kê da weled piou eo ar baleer-bro-ze.

— O, ma zad, eun den a feson eo, heb mar, hag eur pôtr pinvidig.

— Dêz ! Eur hoz aotrou bennag kahet 'n e votou ha kouezet diwar lost ar harr...

— Ma zad, plijoud a ra din hag eñ a zo nay ganin, hennez am-bo pe n'em-bo hini.

— Ma... ma... ma, kerz gantañ eta, med diwall e vefe kerse ganit... Na zevez ket neuze da zuhellad endro din. »

Eureujet e oe Godig hag heh aotrou ; perhenn an Ti-Houarn

a reas an traou war an ton braz. N'eo ket te lar, mabig, aze e oa friko, kred ahanon, ken ma tivere lipig ouz ar mogeriou. Peorien ar barrouz a oa bet degemeret mad. — Me a oa êt ivez ha tapet em-oa kaoud eun dorz vara hag eur pez silzigenn ! — Med kelou ebed euz tud an den yaouank, koz e oant emezañ, ha pell... pell euz Bro Dreger e oa o hastell.

Daou zevez goude an eured, adaleg ma oe êt kuit kerent ha mignoned, an ozah neve a gemennas d'e wreg e oa red dezo bremañ mond da weled e dud :

— Kalonig, me a yelo d'ez-heul e-leh a gari, eme Godig.

Buan e oe dibret e varh gand pôtr e vanegou. Ar benherez a lavaras kenavo d'he zad ha d'he mamm, a azezas a-dreuz war gein an aneval, a-drek he gwaz, hag int arôg... Ar wreg yaouank a oa en he bleud war gein ar jao, he daouarn war diskoaz he muia-karet. Pilpaza a rê al loen hag amzer he-doa da varvaillad evel ma ra an oll verhed eüruz. Mond a bilpazig a zo mad, med red eo ivez trotal eun tammig. Feiz, trotal a reas ar marh e-pad eur pennad mad. Ze na oa ket gwall afer, skuiza a rê evelkent penn-a-dreñv Godig. Med setu amañ eun abadenn all... O paouez treuzi eur bourk edont pa lakeas an aotrou e loen da zaoulammad e-barz eun hent-treuz, etrezeg eur hoad. Daoust d'ar benherez kregi stard e dillad he gwaz, e oe darbet dezi beza tôlet en traoñ meur a wech. N'em lakâd a reas da dermal, med e-leh mond goustadikoh, ar marheger a reas d'e jao redeg d'ar pevar-lamm-ruz hag en em dôlas da c'hoarzin evel eun diaoul. E giz-se e errujont er hoad. Goude beza pimperlamm et hoaz eur pennadig, e chomas ar marh a-zav. An ozah a reas eul lamm en traoñ en eur zacha gantañ e wregig paour a gouezas war he hrabanou... C'hoarzedeg skrijuz, tôliou skourje !... Neuze e tapas krog ar pôtr gouez er paourkêz plah hag e tiskouezas dezi e zaouarn heb manegou, daoulagad bleiz en e benn. Godig a zeblantas dezi e oa o vond da vervel pe da goll he zamm skiant :

— O ! emezi, Santez Anna Wened, al lêr... al lêr braz... O, ma Doue, me zo dimezet da vestr al lêron, perag n'em-eus ket selaouet ma zad !

Hag e semplas penherez an Ti-Houarn. Pan addeuas e-barz, en em gave en eur zal vraz, eur bern gwazed endro dezi o safari, o hopal, o huchal, o hoapâd anezi... Zoken, mabig, pep hini aneze a zeuas da rei eur jotadenn, eur fasadenn dezi... Neuze e oe roet urz d'eur vatez koz da gas anezi da gousked d'ar zolier, rag deut e oa an noz. Hanter gollet e oa he fenn gand Godig, med setu ma lavar dezi an hini goz :

— Ma ! plahig, gwall dapet ez out bet ; me a zo c'hoarvezet memez tra ganin pa oan yaouank hag abaoe emeon o tui gand ar vizer e-mesk diaoulou dichadennet. Med te, mar bez bolante Doue, ne jomi ket. Selaou ahanon, liñseliou ha palennou a zo war da wele... Pa ne glevi mui trouz, gra tammou hir aneze, skoulm an eil tamm ouz egile hag evelse az-po eur gordenn a

helli staga ouz ar prenestr. Ruz d'an traoñ hag en em gavi el liorz. E korn ar voger ez-eus eun tamm dor a zigori gand an alhouez-mañ, hag e sachi da skasou ganit a-dreuz ar hoadou don ha divent ez eo kuzet ar hastell-mañ enne.

Ne dalvez ket ar boan, pôtrig, lavared dit e veulas Godig ar vamm-goz, an Aotrou Doue hag ar Zent... Ha pa oe deut sioul an ti, e krogas dillo gand he labour, kement ha ken bihan ma teuas he zôl da vad. Wardro hanter-norz e oa penherez an Ti-Houarn o redeg evel eun heiez e kreiz ar hoadeier teñval. Addeut e oa kalon dezi ha daoust dezi da gavoud kriz he flanedenn ha trenk ar zoubenn, ne jome ket da dermal. Na kaouenn-gaz na tra all ebed ne zeue a-benn da sponta anezi. Peleh en em gavfe ? Ne ouie ket, med galoupad a rê evelato, ken a rê..

Gand an heol o sevel e teuas fiziañs d'ar benherez, med anken war eun dro :

— Bremañ-souden, emezi, e welo al lêron on êt kuit. O ! Zant Erwan benniget, beteg ne vin ket adtapet.

— Siwaz, a greiz-oll e klevas trouz ponner treid kezeg. Godig a oa degouezet e-kichen eur chapelig. Eur voutadenn d'an nor hag hi digor... Eur beleg a oa aze oh echui eun overenn evid eur bugel klañv. O weled dremm truezuz ar plah e kompren hag e hast buan alhouezi an nor...

— Ya, pôtr bihan, med al lêron a oa gante muled, hag ar re-ze a zant c'hwez an dud.

— A reont, tintin Mari ?

— Ya, peogwir e laran dit.

Ar muled a jomas dirag ar chapel :

— Petra, eme mestr al lêron, al loened-mañ a zo sod, er chapel-ze n'hell ket beza, peogwir e vez prennet a-hed ar bloaz. Ez an da weled memez tra... Serret eo, evel-just, ha plah ebed n'ez-eus e-barz. War or hiz, pôtrig, kerkoulz eo, ne dalvez ket ar boan klask eur spillenn e-touek berniou foenn, honnez a zo kluchet en eur brouskoad bennag, med war petore tu ?... A ! Charn vil, ma adtapan krog ennout...

Pa ne oe mui den wardro, ar beleg a ziskouezas d'ar benherez enkrezet dre beleh mond beteg eun ti-genwerz, e penn ar hoad, e-leh ma vije kemeret da vatez.

Hag homañ da redeg adarre, d'erruoud eno ha da gonta he doareou. Olier, mestr an ti, a lavaras dezi dioustu :

— Chom ganim, ma flah, unan euz an deziou-mañ e vo red din mond d'Ar Roh hag e kasin ahanout d'ar gêr.

Daou pe dri devez goude, e oe gwelet oh erruoud e porz Olier eur baleer-bro gand muled sammert ponner ouz e heul. Godig a anavezaz raktal he gwaz, daoust dezañ beza peget berniou baro, hag hi, en eur grena, da gemenn ar helou da vestr an ti e pleg e skouarn. Hemañ ne oa ket den da sponta, kas a reas kerkent unan euz e vevelien gand ar marh fonnusa da gerhad an arche-

rien. Al lampon a zeuas en ti. Marhadour ivoul a oa, emezañ, ha toukennou leun a oa war choug e loened.

— Tano ez eo bet ho fri, eme Olier, amañ ne oa ken, koulz lared, eun dakenn ivoul, bremaig ez aim da garga ma fodou, med debrit eun tamm da genta ; c'hwi, merhed, netait an darbodou ma vezint prest da leunia.

Red d'an oristal barveg tañva ar hig sal hag ar sistr, ha me lar dit, mabig, ne rê ket sin Olier da ziskarga bannahou dezañ, beb tro ma felle dezañ sevel e revr diwar ar bank, e veze dilerhet... E keit-se e oa êt sioulig an archerien da guz er harri e-leh e oa bet staget al loened. Neuze, Olier da zevel ha da lavared d'ar pôtr e oa prest pep hini da vond da weled e varhadourez. Godig hag he mestrez a yeas d'o heul er harri gand podou pri... leun a gerdenn. Eun tól c'hwistell ha setu lakepoded o tifluka diwar gein ar muled... Ya, med kerkent en em gavjont dirag fuzuilou ar jañdarmed. Evel lern e-barz o zoull e oe paket an oll lêron.

Eun toullad deziou goude, pôtr bihan, int bet krouget berr hag he-deus gellet Godig distrei d'an Ti-Houarn.

Aotrou person Ar Roh a reas terri sakramant ar Briedelez resevet gand ar benherez, ha fidam, n'eo ket te lar, honnez n'eo ket êt eur wech all da zimezi gand eun diavezour, na n'eo êt...

— He setu, kolladenn e dintin Mari, kontant out ?

G.S. — *Ar gontadenn-mañ, evel ar re a zeu da heul, am-eus klevet meur a wech e-pad ma bugaleaj. Estonet braz ez on bet etre 25 ha 30 vloaz pan em-eus lennet Gaspard des Montagnes (H. Pourrat). Heñvel awalh e oa danevell tintin Mari ouz hini ar skrivagner brudet. N'eo ket ar wech kenta e c'hoarvez kemend-all ; kavet ez-eus bet aliez heñveledegez etre mojennou ganet pell... pell an eil euz eben. Eveljust, ma faourkez moereb, kannerez ouz he micher, n'he-doa ket lennet oberou Pourrat ! Zo kêrroh : hi he-doa desket he hontadennou gand he mamm-goz.*

Da dostad eo ivez ar gontadenn-mañ ouz Ali-Baba hag an daou-ugent lèr, evid pezh a zell ouz ar muled.

AR B.

Nim On-Zri

D'am merh Annaig

Tri a oa aneze... Tri vugel o unan-penn... Na tad, na mamm, na pêron na mêronez, na kar na par da zoursial oute.

Mond a rênt a-hed an hentou, o houlenn an aluzenn, ha moan e oa o zammig kov, eveljust. Pôlig e-noa daouzeg vloaz, Yannig deg vloaz hag Yfig, seiz hepken, ar paourkêzig.

Abaoe eun toullad deveziou e oa bet treud eston ar geusteu-renn gante, a-veh m'o-doa tapet kaoud eun tamm bara beb eil deiz ha hoaz an tammou brasa a oa bet roet d'an hini bihan.

Erru e oa an abardêz hag abaoe an deiz 'rôg beure, n'o-doa debret netra... Mond a rênt a-hed an hent, dorn-ha-dorn, ar yaouanka e-barz ar hreiz o klemmichad, an daou all naonieg, skornet, brevet, prest da fakita ha dare da drelati o soñjal e krizder o buez. Tri evn dister kouezet diouz o neiz.

A greiz-oll, en em gavas diraze eur pôtr yaouank gwisket en gwenn, dezañ eun dremm skeduz hag eur minc'hoarz dous ha hegarad.

— Te, mabig, e-teus divinet dioustu e oa eun êl a oa ! Ahanta, ya, eun êl, an êl Gabriel a gav din, diredet a-berz Doue, abalamour ma oa fur an tri bôtzig a lavare bemde o fedennou.

Lavared a reas d'an tri vreur :

— Naon hag anaoued hoh-eus, moarvad, bugale ?

— O ya, aotrou, prest om da vervel gand an naon ha skuiz-marô om ivez.

— Baleit eur hart-leo hoaz hag en em gavot en eur gêr vraz. En eur erruoud, en tu dehou, e welot eun ostaleri. Mond a reot en ti ha roet vo deoh da zebri e-leiz ho kov hag eur gwele da gousked. Me a zo en em gleved gand an tavernour hag e wreg. Med, selaouit bugale, eun dra am-eus da houlenn diganeoh : kloza war ho peg, Pa gomzo unan bennag ganeoh, setu amañ pezh ho-po dreud hepken da lavared :

Pôlig — **Nim on-zri ?**

Yannig. — **Heb pèa ?**

Ifig. — **Rêzon 'h-eus !**

Ha bremañ, ma zammou krennarded, hastit buan mond etrezeg an ostaleri.

— Nim on-zri, eme an hini braz ?

— Ya, ho tri, bolontez Doue eo.

— Heb pèa, eme an eil ?

— Arhant an Aotrou Doue e-neus pèet.

— Rêzon 'h-eus, eme an hini bihan !

Med ne oa mui êl ebed. Ar vugale a gemeras o botou-koad en o daouarn hag a hastas etrezeg kêr.

Ne oe estonet tamm ebed itron an ostaleri nag he gwaz ; zoken o hortoz anezo e oant :

— Azevit aze da goania, bugale.

— Nim on-zri, eme Pôlig ?

— Ho tri, eveljust.

— Heb pèa, eme Yannig ?

— Pèet eo dija.

— Rêzon 'h-eus.

Mad pe fall, mond a rê ar zoubenn war draoñ, mabig, hag ar hig-bevin 'ta ! Peadra da daga ! Ne jomas hini ebed aneze da bismikad evel ma ra ma zamm Nestig amañ... Ba ! kolladenn e dintin Mari eo memez tra... (eur flouradenn pe eur pok ambeze da gaoud hag e kenderhe ma moereb).

Pa oe leun o hovou, an itron, — an tavernour a oa êt da gousked, — a lavaras d'ar vugale :

— Deuit bremañ, ez an da gas ahanoh d'ho kambr.

— Nim on-zri ?

— Ya, ho tri e viot er memez kambr hag er memez gwele, ledan eo.

— Heb pèa ?

— Pèet on bet ive evid ar gambr.

— Rêzon 'h-eus, a echuas Ifig sederêt gand e dammig kovad.

Lakêt e oe an tri vreur en eur gambrig dres e kreh ar pondale. Mestrez an ti a yeas en eur gambr all a-gleiz e-leh e oe klevet o kôzeal gand he gwaz. En tu all d'o hambrig, ar bôtredigou a gleve unan bennag o tirohal.

Evel ma rênt bemnoz 'rôg mond da gousked, e taoulinas neuze an emzivad. Trugarekâd a rejont an Aotrou Doue evid an tôl chañs a oa o paouez c'hoarvezoud ganto.

— O mamm gêz, emezo, c'hwi a zo bremañ er baradoz e kichen ar Werhez, dalhit da zeurel plê war ho paourkêz bugale, on diwallit a-hed an noz,

« O Mari, on mamm muia karet
Roit dim ho pennoz ive ;
Vid on mired ouz an Droug-spered
Chomit e-kichen or gwele. »
« O Êl mad, mignon karanteuz,
On divennit ha deiz ha noz... ! »

Poent braz e oa lakâd an hini bihan en e glud, branskellad a rê war e bennou daoulin. Nag a blijadur evid an tri grennard oh en em astenn etre liñseliou fresk, war eur holhed pell, o fennou war beb a houbenner pluñv, evel aotronez ! Yannig hag lfig a vanas kousket dioustu evel brohed ; pelloh e oe Pôlig... Soñjal a rê en aotrou gwisket en gwenn. Piou a oa hennez ? Daoust hag eñ ne oa ket eun êl ?

— Perag e-neus lakêt ahanom evel tud hanter vud ? Ha dond a ray bemde bremañ d'or zikour ?...

Med e zaoulagad eñ ivez en em zerras.

Eun tamm brao a hun a-nevoa grêt pa 'n em gavas souden en e goaze war e wele : eur griadenn a oa o paouez kleved... Ha bremañ evel ma vije bet kann e kambr an diroher... Korfou o koueza war eur gwele hag eun huanadenn hir ha glaharuz. Ar paourkêz bugel a oa reud e vleo war e benn, prest e oa da grial gand ar spont, med soñjal a reas en e vreudeur, dre eun têt chafis ne oant ket bet dihunet ; furroh e oa lezel aneze gand o huñvreou kêr... O ! tud o kerzed war ar pondale, Pôlig a ra sin da gousked, daoust d'e izili da grena evel eur barr deliou... Dor ar gambr a zigor, ha piou a wel etre e valvennou damzerret ? An tavernour hag e wreg, eñ eur gontell hir leun a wad gantañ hag hi o tougen eur hanteler... Mud ha hanter zemplet, Pôlig a wel ar gwaz o tostâd ouz e wele hag o kuz e gontell dindan ar gourteupoentenn, ar plug. Hag int o-daou er-mêz, kuit d'ober trouz.

An daou vreur yaouanka, mabig, n'o-doa ket fiñvet, med an hini hena ne oa ken kelou kousked gantañ :

— O Santez Anna venniget, emezañ, petra soñjal euz an oll draou-mañ. Perag koach ar gontell-ze en or gwele ?

A greiz-oll e kompren :

— Me a zo sur o-deus lazet an diroher — ne glevan ken anezañ — hag ez eont da damall an torfed-se dim ! Hag ar gwasa zo, n'hellin ket 'n em divenn ha konta pezh am-eus klevet ha gwelet, peogwir n'on-eus ket, koulz lared, dreud da gôzeal... Koustat-a-gousto, red eo senti... Seul-vui e sonjañ, seul-vui e kav din e oa an aotrou gwisket en gwenn eun êl... Gand ze eo red dim plega, tevel, ha ne vim ket dilezet gand Doue.

Kegi a ganas, tamm-ha-tamm e savas sklêrijenn ar mintin... Souden, tud o sevel gand ar viñs, ponner o zreid ha rust o hôz. Tremenn a reont war ar pondale evid mond er gambr a oa safar enni e-kreiz an noz... Ne jomont ket pell, dor kambrig ar vugale a zigor en eun têt : ma Doue, an archerien !

— Hañ ; eme unan anezo, amañ emañ ar ganfarded, ar rede-rien o revr !

Yannig hag lfig a oe estonet awalh o weled ar jañdarmed, med goude o nozvez vad e oa skañv o halonou...

— Lavaret e vefe, eme an heveleb archer, ar brigadier, tri êl kouezet euz ar Baradoz hag int friponed euz an dibab... Ma

n'eo ket eun dreez, bugale a-veh didonet o laza eun den war an oad, eur beajour sioul ha kuñv ! N'oh-eus ket a vez gand pezh oh-eus grêt ?

— Nim on-zri ?

— O ya, ken fall ez oh, moarvad, an eil hag egile.

— Heb pèa ?

— Non de distag, heb pèa, e lavaran me ive, krohen mil ma reou ! Pèa a reot ha pèa ker hoaz.

— Rêzon 'h-eus, eme ar hêzig Doue.

— Hañ ! Gweled a rit, hemañ bihan n'eo ket peurgollet hoaz, anzav a ra emañ ar wirionez ganim...

— Setu amañ ar wirionez ive, eme an eil archer e-noa furchet ha kavet ar gontell dindan ar plug.

— Alo, er-mêz alese, eme ar brigadier o lakâd ar benveg en e zah, torfetourien daonet !

Adaleg ma oent gwisket, ar vugale a oa o vond da zaoulina, med n'o-doe ket amzer, kroget e oe enno : « D'ar prizon ! ».

Eveljust, an ostiz hag an ostizez a oe ar re genta oh ober an hu warne, med a-hed an hent e oe eun afer all... Rikouret e oe en tri bôtig pa oe serret dor an toull warne. Pôlig a gontas neuze d'e vreudeur pezh a oa c'hoarvezet :

— N'on eus netra d'ober, emezañ, nemed senti ouz an aotrou koant gwisket en gwenn ha Doue a ouio on divenn.

Galvet e oe an tri brizoniad dirag ar barner : « Ha gwir eo oh-eus lazet e-pad e gousk eur beajour en ostaleri, du-hont ? »

— Nim on-zri ?

— Ya, ho-tri a oah, herve, oh ober an têt.

— Heb pèa ?

— Geo, an traou-ze a vez pèet ker, bugale.

— Rêzon 'h-eus.

— Setu, eme ar barner, n'eus ket ezomm diskleriaduriou all... An hini bihan n'e-neus ket hoaz desket liva gevier. Ahanta, kanfarded, ar re a laz a vez lazet, barnet oh da veza dihouget.

— Nim on-zri ?

— Ya, ya, an eil warlerh egile, med goulenn a rafe unan bennag an hini bihan da beurzevel.

— Heb pèa ?

— ... !

— Rêzon 'h-eus, eme lfig, e-noa c'hoant gouela, sammet ken e oa sammet e galon, med Pôlig a rê sin dezañ da gaoud fiziñs.

Hag an tri vreur, ambrouget gand archerien, war-du ar chafod a oa bet savet war blas kêr. Ar pôtr hena a oa krog e daouarn e vreudeur hag e-mesk an engroez a dud a oa war ar blasenn, e zaoulagad a glaske unan bennag... Siwaz, erru int ouz troad ar chafod...

— Na rez ket gwad fall, mabig, eme tintin Mari, ne veer jamez dilezet gand an Aotrou Doue, 'h ez da weled.

Erru e oant eta... Eur jañdarm a voutas Pôlig daved ar boureo,

eur pikol orystal gwisket en ru gand eur pezh bouhal... Neuze, pôtrig, e oe gwelet eur marheger e zillad gwenn o tifoupa war an dachenn hag an dud o souza evid rei plas d'ar marh da dremen. Savet e oa e zivreh gantañ :

— Hopala, emezañ, gortozit, eun dra a-bouez am-eus da lavared...

Eul lamm e-tal Pôlig sederêt... Neuze ar marheger, pe gentoh an êl, a bed ar barner da zond en e gichen, a zav e vreh evid goulenn gand an dud tevel hag a lavar da Bôlig :

— Bremañ e hellez komz !

Hag ar pôtrig da gonta...

An tavernour hag e wreg e oa deut poan-gov deze hag e oant o vond da dehel, med an archerien a oa êt sioul ha brao dreke... Boutet ha sachet, setu an daou haillon war ar chafod hag an dud o krial :

— Dihouga anezo ! Dihouga anezo !

Feiz, prim ha brao e oe grêt an tamm krenna deze.

An êl a oa dija êt kuit gand ar vugale, êt e oa da gas aneze d'eun ti eo bet brao deze ennañ. Peurzavet int bet e karantez Doue en eur zeski eur vicher, int o zri, heb pèa ha gand rêzon, lakeda, mabig-me ?

Pipi ar Roh

D'am merh Gwenola.

Pipi a oa eun tamm koz kereer o chom e-kichen chapel Ar Halvar... Ne oa ket rust war al labour ha techet e oa kentoh da huñvreal... A-viskoaz e-noa bet daou venoz : bale bro ha skrapa peadra da veva heb beza e vuez-pad o kalvichad tammou ler. Ya, med Soez ar Jujerez, e hini goz, a zalhe tenn warnañ hag he-doa poan zoken o lôskel anezañ da vond da eva eur chopinad sistr en ostaleri tosta.

— Eun druez eo huali an dud evelse, krohen mil ma reou !

Kement ha dizaha e govad imor fall e-noa tapet krog ar hereer loull e-barz eur pikol tamm ler hag eñ da skei gantañ eun tôl spontuz war e dôl labour... Ha setu deg kelienn laz et moust. Eun distokadenn all, hag ar wech-mañ e chomas c'hweh kelienn all war an dachenn...

— Taœ 'zo, Soez, me a zo eur c'hwil peogwir e lazan deg d'eun tôl ha c'hweh d'an adtôl.

— Ya, eur c'hwil ez out, med eur c'hwil-dero, koz sah-c'hwez. Moarvad n'out ket o vond da glogori evid beza laz et kelienn ?

— Soez, te a zo sod evel eur penton ; n'eo ket red din, emi-chañs, komz euz kelienn, lavared a rin : Me eo Pipi ' Roh, a laz deg d'eun tôl ha c'hweh d'an adtôl.

— Lavared a rin... Da biou e lavari ze, genaoueg ?

— Da biou, Soez ar Jujerez, da biou... Feiz, d'an hini a zo kap da rei eun tamm pañsion din, d'ar roue, ha da hini Pariz, war ar marhad, ha ne vin ket teir eur o 'n em brepari.

Klozet he beg da Zoez, Pipi a dapas krog en e benn-baz, a halvas e gi Mizerig...

— Arsa, loukez, n'out ket o vond memez tra...

— Geo, Soezig ma halon.

— Ma, paourkêz « letezenn » (1), tapet e vo ar raz dit e Pariz.

Med ar hereer a oa dija er-mêz hag eñ da zacha e skasou gantañ.

Penôz e tapas Pipi erruoud beteg du-hont, mabig ? Herve va mamm-goz, ne vanke netra dezañ adaleg ma griet :

— Me eo Pipi ' Roh a laz deg d'eun tól ha c'hweh d'an adtôl !

Degouezoud a reas ouz toull dor vraz Pariz, eur bern soudarded dirazi.

— O hola avad, eme Pipi, ar ganfarded-mañ a zo gouest da harz ahanon da vond tre...

Hag eñ da huchal gwaso ma helle :

— Me eo Pipi ' Roh a laz deg d'eun tól ha c'hweh gand eun adtôl !

— An diaoul ! a zoñjas ar zoudarded hag int da lezel Pipi da dremen heb marhata. Ne oa ket pell ar Rohard o kavoud ti ar Roue e-leh e antreas reud ha sonn evel eun tonton-besk.

O klevet e oa er porz eun orystal fêsonou terrupl warnañ, e tiskennas prim-ha-prim ar roue euz e gambr :

— Aotrou Roue, eme or henvroad, me eo Pipi Ar Roh a laz deg d'eun tól ha c'hweh gand an adtôl !

— Krohen va haz, te a zo eun ibill avad, Pipi, ha petra a fell dit a-berz da roue ?

— Tæoe zo, sir, eun tamm pañsion na rafe ket droug din...

— Doustadig, Rohard, arôg kaoud pañsionou amañ, e vez red diskouez pez a ouzer ober. Peogwir ez out eur gwaz frank e jiletenn, setu pez az-po d'ober :

E-barz ar hoad braz a welez du-hont e vev pevar ramz, pevar jeant, mar deo gwelloc'h ganit ; foeltr Doue, biskoaz n'eo bet posubl dond a-benn outo ha n'eus nemed poan ha trubuil diwar o helou. Kas al lamponed-ze d'an ivern, Pipi, hag e vim kamaradou.

— O ma Doue benniget, me n'on ket evid jeanted, aotrou Roue, n'on moarvad, nemed eur hrennard e-kichen ar babored-se, eme Pipi, berr warnañ.

— Tatata, pôtr Ar Roh, an neb a zo gouest da daga deg d'eun tól a dle beza kap ive da derri o goug da bevar ramz. Setu amañ eur hleze, Pipi, ha kerz gand da labour peotramant ez eus eun toull sioul e-barz ar hastell-mañ hag e vi lakêt da ziskuiza ennañ.

Ha kuit ar roue en eur c'hoarzin, ha moan revr Pipi ken e oa moan. Petra a raje ar paourkêz kereer nemed mond etrezeg ar hoad peogwir ne oa tu ebed d'ober ahendall ?

Dre forz pateri ha gervel d'e zikour ltron Varia a Druéz,

(1) **letezenn** (= genaoueg), gei euz trefodaj Ar Roh (gwelit va levr : « Lo Roche-Derrien et ses environs »).

santez Katell, Alfoñs Ligor, Charlez Bleiz, hag oll zent iliz ar Roh, heb ankounahâd santez Goupaia euz Langoad, en em gavas Pipi er hoad braz diskouezet dezañ gand ar roue. Ne oa ket evelato ar hereer eun den da jom da glemmichad :

— Ar gwella am-eus d'ober, emezañ, eo krapoud war unan euz ar gwez-se ; ne oa ket par din gwechall evid diloja neiziu pig.

Poent a oa dezañ... Eur gwaz lard ha divent a oa oh erruoud. Dao dezañ, eme Pipi :

— Selaou 'ta, pôtr, petra eo al loen vil a zo aze e-mesk da vleao ? N'ez ket da stoka outañ gand doan na vefez piket, deus amañ ha me a lemo anezañ dit gand ma baz.

Ha petra, a zoñj dit, mabig, a reas Pipi ? Ahanta, tenna a reas e gleze ha bouta a reas anezañ en unan euz daoulagad ar ramz ken a zeuas er-mêz dre e eilpenn.

— Ma, eme ar hereer, stad ennañ, deut eo va zôl da vad, perag ne rafen ket kerkoulz gand ar re all ? Ma 'z int ken zod hag o breur !...

Hag eñ en traoñ hag o vond etrezeg eur vereuri e-leh ma houlenas gand ar venajerez aoza dezañ eur pod-houarniad soup :

— O, n'on ket eun den figuz, emezañ, grit din soubenn an tri draig :

dour, holen ha baraig.

Damañ din ive eur c'hwezigell porhell ha diskouezet din peleh emañ kustum ar ramzed da dremen.

Hag e oe grêt.

Pipi a azezas war ar hlazenn e-kichen e bod-houarn, a gargas e c'hwezigell gand soup, a goachas anezi dindan e jiletenn hag a hortozas. Adaleg ma klevas Mizerig o harzal ha dreist-oll pa welas ar ramz o tifoupa e penn ar wenodenn, or pôtr fin a reas van da garga e gorf gand peziou loaiadou soup :

— Hep, den braz, kap ez out-te da zebri kement a zoup ha me ? Rag, n'eo ket awalh, pa vez leun ma hov, e tigoran anezañ hag e hellan adkregi gand ma fred.

— Ya da, penn gaouiad, penôz e rez 'ta neuze ?

Pipi a skoas eun tól kontell er houezigell hag ar zoubenn a ruillas er-mêz evel diouz eur feunteun.

— Ma 'z out-te barreg d'en em zizaha evelse, eme ar ramz, me a zeuio hoaz bravoc'h ganin.

Gorzailenn vraz ar jeant ne oe ket pell o lonka ar pod-houarniad soubenn, ha goude eñ o tigeri e gov gand eur pez kontell kiger hag en em zivouelloui e-unan, ar genaoueg.

— Daou all a zo hoaz, eme Pipi...

Ar wech-mañ e yeas da garga e hodellou gand kaouled. An driven ramz a blije dezañ pesketa a-hed eur froud dour rust ha don. Eno e azezas ar Rohard d'e hortoz goude beza klasket eur vilienn wenn. Pa glevas ar jeant o tostaad, e kemeras eun dorniad kaouled hag eñ da verad ar vilienn hag al laez da zivera.

— Petra emañ te oh ober aze, krennard divergont ?
 — Feiz, o horo ar vilienn-mañ, pezh n'out ket-te evid ober, daoust dit da veza braz ha kreñv.
 — Paourkêz preñv-douar, diskouez da vilienn din.
 — Hañ nann, homañ n'ez-eus kazi mann ebed enni ken, red e vo dit tapoud unan all en dour.

Ha setu, mabig, ar ramz berrboelleg o 'n em lakâd war e gov a-rez ar ribl, a-uz d'an dour, evid dibab eur vilienn wenn dindan an eon. Ne veze gwelet ken nemed e ziouhar hag e dreid palañkou. En treid-se e tapas krog Pipi ha, heb re a boan, a benboellas ar ramz en dour-red e-leh e oe ruillet, diruillet ha beuzet...

— Hag egile all, ar pevarved, petra an-nevoa grêt Pipi dezañ ? N'ouzout ket, hañ, pôtrig ? 'Hanta, selaou.

Tostig awalh alese e oa eur hleuz gand eun toull e-barz, e-giz eun toull louarn...

— Gand an tamm riboul-mañ e vo red din c'hoari, eme ar hereer, rag klevet a ran mouez garo ar pevare inosant.

Hag eñ da dremen ha da adtremen e-barz, evel eur hrennard chomet d'ober skol louarn, goude beza klenket e gleze en tu all d'ar hleuz.

— Pe zod pe nay ez out, koz foerer koz ?

— Ba, ar re war an oad eo red dezo ive kemer o flijadur ; gand ar ginglañv e oan ez on deut d'ober eun tamm tro ez koad. Deus da c'hoari ganin... Ale, ar haz war-lerh al logodenn !

Ya, med eun tamm brao a gaz a oa hennez : e benn a dremenas... hag e-pad e oe o sacha war ar peurrest, Mizerig o tanta e zivorzed gwas ma helle... al logodenn a drohas dezañ e hou-zoug gand eur mell tôl kleze ken n'e-noe ket amzer da lavared « ouêk ».

Goude beza kemeret eur vriñsenn vutun, heb koll amzer, Pipi a zistroas dioustu d'ar palez en eur gana a-bouez-penn.

Na roue na den n'houle kredi e-noa lazet ar Rohard ar ramzed. Mond a rajont da weled ha kavet e oe ganto ar horvou maro. Ha Pipi da adhoulenn e bañsion, eveljust.

— Ya, ya, hag az-po, med 'rôg e vo red dit lavared din petra a zo ganet du-mañ an deziou-mañ, eme ar roue.

— Arsa, sir, me n'on ket zorser, na n'on...

— Plah pe bôtr, Pipi ?

— An hini kenta a dle beza, eme ar Rohard dioutañ e-unan en eur skrapa e benn. Eur plahig, emezañ, a greiz-oll.

— Mad, Pipi, deut eo ganit, eun diviner ampart out.

— Ez an bremañ da vond, Aotrou Roue...

— Ya, mond a ri, med amzer zo ; arôg e vo red dit hoaz lavared din petore loen a zo tôlet er hoz pod-houarn-ze.

Chesuz ! Pipi a oa erru kerse gantañ. Dond a reas da zoñj dezañ euz geriou diweza e hini goz :

— Tapet e vo ar raz dit e Pariz !

— O hola avad, a zoñjas ar hereer, ma vefe eur raz, e gwirionez !

Teurel a reas fed ouz Mizerig a oa krog da harzal ha d'ober ardou endro d'an darbod goloet mad. Pipi a anavez e damm ki :

— Aze, emezañ, a vouez uhel, ez-eus eur raz.

— A zo gwir, Rohard, deut eo ar maout ganit, setu amañ yalhad genta da bañsion hag eul loen kezeg diliket evid retorn d'ez pro.

Goude beza trugarekêt ar Roue, ne jomas ket Pipi da louedi e Pariz ; hasta distrei d'ar Roh eo an hini a reas. Gwelet e oe o tifoupa war Blas-kêr, eun nozvez, pa oa anjelus chapel ar Halvar o son hag ar paourkêz Soez o ouela hag o paouranti e-tal he dor, o hortoz he zamm pried. Darbet e oe dezi tapoud eur fallaenn, med tremen buan a reas dezi pa lakeas he muia karet ar yalhad aour dindan he fri.

Pedet e oe Pipi da gonta... Me a oa o selaou, evel ma welez, pôtrig...

G.S. — *Skler eo ez eus kerentiez etre Kemener bihan kaloneg Grimm hag ar gontadenn-mañ.*

Ar vamm gollet...

*D'am fillor Gweltaz, d'e c'hoarezed Arzela
ha Joela ha d'e vreur Bernez.*

— Ar wech-mañ, mabig, ne lavarín ket dit na peleh na pegoulz eo tremenet an traou ez an da gonta : mamm-goz ne ouie ket.

..

Lakaom ez eus daou pe dri hant vloaz e oa o chom e penn eur hoad braz-braz-braz, en eun tammig tiig soul, eun tad, eur vamm hag o daou vugel : Mariig, eunneg pe daouzeg vloaz hag lfig, nao vloaz. An tad a yê bemde da ziskar gwez gand eur mell-bouhal hag e houneze evelse bara e damm famill, med eun devez e teuas an archerien da gerhad anezañ da vond d'ober brezel. Pebez rann-galon evid e wreg hag e vugale !

Pa oe gouelet leiz-kov ... honnez, mabig, eo aliez lodenn ar re baour war an tamm douar patatez-mañ... e oe red d'ar vamm soñjal pourvezi boued d'he bugale. Ne vane ket kalz tra en ti : eun tammig bleud e-barz eur beel. Eur mintinvez, pa oe goulllo homañ, ar vamm a lavaraz d'he bugale :

— C'hoant awalh am-boa da jom amañ da hortoz ho paour-kêz tad, med mervel a rafem gand an dienez ; n'on-eus netra da zebri ken, dao eo dim treuzi ar hoad evid mond da di ho mamm-goz. Eun tamm brao a hent a vo d'ober, med c'hwi a zo bugale kaloneg, n'eo ket gwir ?

Ar vugale ne zonzent nemed eun dra : « E ti mamm-goz or-bo leiz-kov. » Ha kerkent e krogjont e dorn o mamm evid mond kuit.

..

Brao e oa kerzed war hent striz ar forest. Dibenn Gwengolo. Tomm e oa chomet an amzer ha meur a evn a richane hoaz e-mesk ar glazadur krog da louedi : « Kig hag u (vi) » a gane heb paouez eul labous bihan.

— Ma ! te-teus chañs, eme lfig, ma teus kig ha viou, ni n'on-eus ket zoken eur hreunenn vara.

Med ar pôtrig ne jome ket da dermal, kemer a rê plijadur o ruza e votou-koad en deliou seh. Dindan eur wezennig e kavaz medalennou ruz eur babienn. Hogen prestig e oe skuiz hag e c'hoar ive, ha neuze naon o-doa ken o-doa.

— E-tal ar waz-mañ e vim diouz ar henta evid diskuiza, eme ar vamm, dour sklêr or-bo da eva da vihanna. Dastumit pep hini eur zamm raden zeh, grit eur gwele ha kouskit e-pad ma vin-me, bugale geiz, o klask eun dra bennag deoh da zebri.

Grêt e oe an tamm labour-ze prim-ha-prim hag heb dale e vanas an daou gêzig sorenned ha souchet an eil diouz egile. Dirohal a rejont beteg mare kuz-heol pa oe deut an amzer da freskâd. Pebez souez pa zigorjont o daoulagad ! O mamm ne oa ket distroet hoaz. Eur pistig a zantas Mariig hag lfig en o halon :

— Beteg n'eus ket c'hoarvezet netra gand mamm, iskiz eo n'eo ket erru !

Med re naon o-doa evid soñjal pelloh. Setu int da zastum eun dra bennag da grignad : frouez, greun, gwriziou ha tammou traou ken divalo all. Krog e oa da deñvalâd pa oe damdorret d'o naon. Ne oa ket erru o mamm. En eur ouela e hourvezjont adarre war ribl ar waz hag e advanont kousket.

Siwaz, pa zihunjont an deiz warlerh beure, o mamm ne oa ket aze hoaz, hag an daou baourkêzig da zifronkal :

— Allaz, eme Mari, eur gwalleur bennag a zo kouezet war mamm.

Eur bannahig dour, eur zunadenn bennag, hag eur grignadenn all ha setu int adarre war o bern-raden gand ar fêz e oant.

Nozi a rê pa zigorjont o daoulagad. Gouela truezuz a rejont hoaz eur wech, peogwir ne oa ket retornet o mamm, med ar plah a gomprenas ne oa ket fur chom pelloh da zuhellad :

— Ma zamm breurig, red eo dim mond ahann ar buanna posubl pe mervel a raim gand an naon. Siwaz, mammig ne zeuio biken da glask ahanom amañ Selaou, lfig, te a zo eur gwell nejater, krap war an dillenn uhel-ze ha sell endro dit hag eñ ne weli ket eun ti.

Daoust dezañ d'ober kov-moan eun tamm zo, ar hrennard a bignas beteg beg ar wezenn evel eur wiñver ha, goude beza troet e zellou endro dezañ, a huchas d'e c'hoar :

— Mai, gweled a ran eur skleurenn houllou, moarvad ez-eus eun ti du-hont.

— Sell ervad e petore tu emañ.

— Just dindan ar steredenn vrasa, n'eo ket Gwerelaouenn a vez grêt outi, Mariig ?

— Geo, diskenn ha diwall da goueza.

Ar vugale a heulias dorn-ha-dorn eur wenojenn etrezeg ar steredenn. An hini a groge doan dezañ a zerre e zaoulagad. Buan awalh en em gavjont dirag ar prenest sklerijennet. Ne oa aze nemed eun tamm ti soul heñvel ouz o hini.

War eeun d'an nor hag int da skei :

— Piu a zo aze ?

— Daou vugel kollet ganto o mamm er hoad ha dare da vervel gand an naon !

— O, Zalver benniget, eme gwreg an ti, hastit buan dond e-barz m'ho-po beb a damm soup !

Eur bern bugale a oa en ti. Ifig a gavas eur plas evelkent ouz tûl ha Mariig a dapas unan bihan war he barlenn. M'az-pefe gwelet aneze, kalonig, o tebri pe o lonka o skudellad soup !... Ha koulskoude ne oa ket hini fresk, ken mitonet e oa ma talhe al loaiou o-unan en o zav. Evid Mari hag he breur e oa ar gwella meuz o-doa debret biskoaz. Hag int da gonta.

— Paourkêz bugale, eme ar vaouez, ho mamm a zo bet taget gand eul loen fall bennag pe dapet gand lêron ; gouzoud a ran e teu tud iskiz awalh da brena glaou gand va gwaz ; klevet em-eus anezañ o lavared ne ouie ket euz peleh e tiflukent. Ma ouifen ne rafe ket Job re a dodillon, e lavarfen deoh ho-taouig chom ganim, med kement a vugale on-eus dija ha ken stard eo beva ! Gand aon e vefe mezo, eo gwelloc'h gortoz ahann warhoaz evid komz ahanoh. Êt eo da werza glaou en kêr ha n'eo ket erru hoaz. It da gousked d'ar zolier, en em skoachit e-mesk ar foenn ha na rit ket a drouz.

Goude beza trugarekêt mestrez an ti, beza grêt eur min-c'hoarvezet, aon dezi da weled he gwaz o teurel ar vugale er-mêz. Med ar glaouer a oa war yun ha ne oa ket eun den fall daoust d'e zoareou rust :

— Meget din ez eus bugale amañ !

Ar paourkêz gwreg a hastas dond da zibuna dezañ peza a oa c'hoarvezet, aon dezi da weled he gwaz o teurel ar vugale er-mêz. Med ar glaouer a oa war yun ha ne oa ket eun den fall daoust d'e zoareou rust :

— Grêt mad e-teus, Katell, degemer anezo, me a lardo muioc'h

war al labour, ha neuze ar plah a zikouro ahanout endro d'ar re vihan hag ar pôtr a droho koad d'ober glaou.

..

Evel ne oa ket figuz ar vugale, e oe brao deze e ti ar glaouer. Hogen wardro eur bloavez goude, Mari a lavaras eun devez d'he breur :

— N'ouzout ket peza vank dim amañ ? Ne vez lavaret morse na pater na noster ha re bell emaoñ ouz eun iliz evid mond d'ar hatekiz. Mamm he-doa grêt din ober ma fask kenta ha te e vefe mad dit ober da hini ive, nehed on gand ze. Red e vefe tostâd d'eur barrez bennag, fenoz e komzin gand ar glaouer hag e wreg.

Pa reas ar plahig he hefridi gand komzou dous ha seven, Job a lavaras goude beza skrapet e benn :

— Feiz, bugale, ni a oa kontant da vired ahanoh, med kompren mad a ran... Warhoaz ez in da gas glaou d'ar gêr nesa, n'ho-po ket nemed dond ganin.

Antronoz e oe dêlou e peb lagad da eur an disparti. Goude beza briatet pep hini e pignas an daou emzivad e gwetur ar glaouer. Eveljust, ne oant ket dineh : daoust ha kavoud a rafent eun tamm labour ?...

— N'it ket d'ober gwad fall, eme Job, an oll dud a anavezant du-hont. Pep hini ahanoh ho-taou a gavo e doull bremaig.

Gwir a lavare. Gand unan goz o chom en ti kenta e houlenas :

— Erru oh divalo Mai-Von, n'ho-peus ket ezomm euz eun tammig plah diliket da zikour ahanoh ha da zederâd ho penn deoh ?

— Geus 'vad, glaouer, lôsk da verh amañ, ne vo ket maleüruz ganin, na ne vo.

Ifig a oe kaset e ti an apotiker. Hemañ a oe laouen gand an tamm toupard a baotrig-se a anaveze hentou ar forest, hag e oa mad dezañ ober n'eus forz petore labour. Gelloud a rafe deski dezañ dibab louzou war ar-mêz.

A-drugarez d'ar glaouer, pep hini eta euz an daou emzivad a oa kouezet gand tud a fêson. Ifig a oe kaset d'ar hatekiz ha zoken grêt e oe skol dezañ gand e vestr.

..

Pevar pe bemp bloaz goude. Eun nozvez e oa d'ober kas remejou d'unan klañv o chom e penn all ar forest. Sklêr e oa al loar, Ifig a reas eul lamm war gein e varh ha dillo etrezeg ar

hoadeier. En eur haloupad etre ar gwez braz e soñje er hlahar o-doa bet, e c'hoar hag eñ, dindanne. Dond a reas an hent da veza striz ha rust etre ar brouskoadou ha, daoust d'al loar-gann ha d'e letern, ar pôtr yaouank e-noa d'ober evid chom heb dihencha. Gwelloh e oe gantañ diskenn diwar gein e varh ; hag e kerza sioulig-tre gantañ pa zeblantas dezañ kleved komz en eun tu bennag :

— Arsa, emezañ, diouz peleh e teu ar vouezig-se ?

Chom a reas da zelaou difiñv hag a-benn eur pennadig e hourvezas hag e pegas e skouarn war an douar. Ha setu pez a glevas sklêr mad ar wech-mañ :

— O ma Doue, pegen maleüruz ez on me : bepred dindan an douar amañ oh aoza boued d'al loened didruez o-deus dispartiet ahanon diouz ma bugale... Ma bugale gêz ! Daoust petra ez int deut da veza ? Ma n'he-deus ket truez ar Werhez venniget oute, ez int marvet gand an naon er forest. Hag eur flipad amzer abaoe !...

Ifig a zavas, dêlou en e zaoulagad hag e zaouarn juntet gantañ etrezeg an neñv :

— Bennoz da oll zent ar baradoz, mamm n'eo ket maro !

Gand e gontell e reas merkou war diou pe deir wezenn, kuit a drouz e kasas e varh pellohig, ha neuze eul lamm war e gein hag ar buanna posubl e yeas da gas al louzou d'ar hlañvour. Ha kerkent goude, war lein adarre etrezeg ar gêr dre eun ale all euz ar hoad.

Goude beza selaouet pez a gonte Ifig dezañ en eur zifronkal, an apotiker a yeas raktal da zihuni an archerien hag eun toullad kamaradou ha neuze e tizroas da gerhad ar pôtr yaouank hag e fuzuil.

Ifig, al louzaouer ha mestr an archerien a gerze er penn arôg ; d'o heul e teue eur bern tud all an eil warlerh egile, sioul evel kizier o logota ha peb a venveg gante.

Eur helh ledan a oe grêt gand an oll dud-se endro d'ar gwez merket, ha pep hini da glask ar riboulou a gase da geo al lêron...

Bepred e oa sklêr al loar... Ifig ne oe ket pell o kavoud eun toull a-dreñv eur forhad diharzadur, hag eñ e-barz dioustu gand e vestr hag an archerien, e-pad ma chome an dud all da hedat er-mêz.

Erruoud a rejont en eur zal vraz ma oa kousket enni al lêron : darn en o hourvez war eun tamm plouz, darn all o fri gante war an dôl stlabezet a win. An hailloned-se a oa heb mar hanter vezo. Ne oe ket diêz paka aneze.

Ifig e-nevoa klasket ar gegin : eno e kavas e baour kêz mamm. Pa gomprenas homañ e fellas dezi simpli, eveljust : pebez joa da bokad d'he mab ha da gleved e oa beo ive he merh, ha brao

dezi !... Hi e oa eun druez he gweled gand ar strujet fall e oa : evel eur gïoh, ha gwenn evel eur houlaouenn-goar.

.....

Eun nebeud miziou hepken e chomas beo ar vamm baour, med mervel a reas dineh war amzer-da-zond Mai hag Ifig, a oa bet diwallet ken mad beteg henn gand dorn Doue ha madelez ar Werhez.

Fanchig Piti-Boutig...

Da verh ha merh-vihan Tintin Mari ha d'o Hatellig.

Fanchig Piti-Boutig a oa eun tamm pôtr-kozig seder, gwevn e izili, lemm e spered ha marhadour spillou diouz e vicher. Ya, marhadour spillou e oa, med traou all a werze hoaz : nadoziou a beb seurt, nozellennou a beb liou, neud, mizilouriou, ha me oar, eur bern fardaj a veze gwelet er voest vraz a zalhe e pign, war e gein pa veze serret, war e gov pa veze digor, gand eun tamm brao a lerenn. Evelse e houneze e damm buez, ar paourkêz Fañch, kuit d'ober gwad fall hag o vale diouz an eil bro d'eben, rag ganet e oa gand hollen kraz e-leh ma laran dit, pôtr bihan.

Eun devez e oa Fañch o treuzi eur pez koad braz 'n eun tu bennag du-hont e koztez Kerneo. Kerzed a rê dibreder o hwistellad d'ar mouilhi pa glevas, a greiz-oll, unan bennag ouz e hervel :

— Fañch, deus amañ !

— Hañ ? Petra ar foeltr, piou a anavez ahanon e-kreiz ar hoad divent-mañ ? Moarvad em-eus huñvreet.

Med kleved a ra memez tra adarre, selled a ra neuze ervad endro dezañ ha petra a wel, mabig ? Darbet eo da Fañch koueza war e revr, boest ha toud... N'ouzout ket petra a wel ? eul leon oh ober sin dezañ hag en e gichen eur pikol elefant hag eun erer e veg kamm :

— Chezuz Maria Kredo, eme Fañchig, eur c'hwezenn yen en e gerhenn, ez an da veza diframmet ha debret gand an tri babor-ze.

Soñjal a ra tehoud, eveljust, med al leon a halv anezañ evid an deirved gwech. Ne oa d'ober nemed senti ! Tostad a reas Fañchig, hag en eur zaludi izella ma helle e houlennas :

— Petra a fell deoh, aotrou Leon ? Ha deoh-hu aotrone ?

— Taoe zo, eme al leon, ni on-eus lazet etrezom ar haro gorneg-mañ, med nehet ez om chomet evid troha ha lodenna ar

hig. Te teus eur gontell, Fañch, ne vefez ket kontant d'ober an tammou ?

— Mardouen, geo memez tra. Eur gontell lemm ha hir ameus ha ne vin ket pell o rei e lod da bep hini.

Ha Fañchig da gignad ha da droha kerkoulz hag eur higer a vicher, c'hwenn en e loerou, med e veg o farsal evelkent. Grêt e labour, ar marhadour a gimias hag eh adkemeris e hent. Med ne oa ket erru e penn an ale pa glevas adarre :

— Fañch, deus amañ !

— An tôl-mañ, eme ar paourkêz den dezañ e-unan, eo echu din, moarvad o-deus debret ar hig ha n'o-deus ket bet trawalh ! Petra a rin nemed mond ?

— Galvet em-eus ahanout adarre, eme al leon, rag va daou gamarad a zo kontant da rei din perz en o lodenn, an elefant na zebr ket kalz a gig hag an erer ez eo brasoh e zaoulagad eged e gov.

Troha ha kalvichad a ra ar foeter-hent ahanon eo kresket da vad bern al leon, kuit evelkent da goaha re lodenn an daou oristal all. Neuze or pôtr da zaludi ha war-rôg !

Emañ o vond da drei e penn an ale ha da zacha e skasou gantañ pa glev eur wech ouspenn mouez spontuz al leon :

— Fañch, deus amañ !

— Ma, an tôl-mañ ez eus c'hwez ar zuillet gand an afer, sur on euz ma jeu, eme ar paourkêz... Ma Doue, me 'zo glaharet d'ho peza kement ofañset abalamour...

— Fañch, n'ouzout ket peleh e oa or penn, edom o lezel ahanout da vond heb rei dit an disterra gopr...

— Tatata, aotrou Leon, etre baleerien-bro...

— Geo, geo geo, eun tamm gwerz-butun memez tra, setu amañ eur reunenn euz ma fenn ; pa lakay anezi war da dal e teui da veza eul leon euz ar gwas ha n'az-po aon rag den na loen.

— Mil bennoz deoh, aotrou Leon, bremañ e vin eur gwaz da vihanna.

— Setu amañ eur reunenn ivez, eme an elefant, pa vouti anezi e-mesk da vle e teui da veza ken braz ha me, ken ponner ha me, ken kreñv ha me ha n'az-po ket d'ober krena ken...

— Mil trugarez deoh, elefant braz, setu aze eur prof a dalvoudegez.

— Ha diganin, eme an erer, dal eur bluenn diwar va hilpenn. Adaleg m'az-po c'hoant d'az tifenn ha da nijal, pik da gokenn gand troad ar bluenn hag e teui da veza heñvel ouzin, ha n'eus ket eun êr abaf warnon, bez ez eus ?

— Mardouen, n'eus ket 'vad, eme Fañch ; me a oar ez oh roue an evned. Bennoz Doue a greiz kalon deoh ho-tri ha kenavo eur wech all.

— Kenavo, kamarad, hag avantur vad dit.

Pôtr ar Piti-Boutik a hellas erfin sach a skasou gantañ ha me lar dit, mabig, ne jome ket da ruza e dreid gand an nebeud a fiziañs e-noa en e vignoned neve.

Wardro adverenn e erruas en eur vereuri e lost ar hoad, hag e houennas eun dra bennag da zebri :

— Feiz, eme mestr an ti, amañ e vez roet bara d'an hini a labour. Kas ar zaout er-mêz hag e vo lakêt dit en eur baner peadra da derra da naon.

— Da eo ganin, a respontas Fañch.

— Mad, kas al loened neuze er prad trihornieg a gavi du-hont e penn an hent, med diwall da lakâd aneze er prad brasoh ha drusoh stok outañ, rag hennez a zo d'ar ramzed ha n'eo ket brao kaoud afer gante ; n'ouzon ket ped pôtr-saout o-deus mouget din !

Erru er peurvan, Fañchig a gavas e oa gwell-seh an traou :

— Amañ, emezañ, ez eus nebeud a dra da bismigad evid ar chatal : pegeid e vefent o karga o hovou ?... Da zutal, me a ya da lakâd aneze e prad ar jeanted : pegen druz ar yeot, pehed eo lezel an traou da goll !

N'e-noe d'ober nemed digori ar gloued : al loened a ouïe e oa boued mad eno...

Ne oant ket krog mad da beuri pa erruas e-kichen Fañchig eur pikol pez den deg troatad dezañ.

— Petra, preñv-douar, piou e-neus roet dreud dit da vesa em frad ?

— Person Lanvizeg (1), eme ar mesaer.

— Gortoz, pez divergont...

Med Fañch e-noa tapet prim-ha-prim en e hodell ar voest vihan e-noa klenket enni profou an tri loen gouez kavet gantañ er forest. Ar reunenn leon war e dal... Ha setu ar hiziad o tond da veza eul leon diouz ar gwas, a lammas en eur yudal war ar ramz hag henn dispennas gand e zent hag e ivinou.

Addeut da veza den, Fañchig Piti-Boutik a zastumas e voest vihan prisiuz hag a zebras frankil ha brao e adverenn : bara amann a oa bet lakêt dezañ. En eur zerri e gontell, e welas e oa erru tenn war kovou ar zaoud hag e stagas da gas anezo d'ar gêr en eur gana a-bouez-penn. Mestr ar vereuri a oe estonet o weled e chatal o tizrei ken abred ha leun o hovou evelkent :

— Peleh e-teus kavet boued ken frank, Fañch ?

— Feiz, e prad ar jeanted : e-leh ma 'z eus eo ar gwella kemer.

— Ha n'ez eus deut hini ebed anezo da êsa tapoud krog ennout ?

(1) E Lanvizeg (Lanvézéac), parrouz vihan-vihan euz kanton ar Roh, n'ez eus person ebed pell zo. Brao eo iliz koz Sant-Ezekiel, enni eur hrist gwisket gand eur zê.

— Geo, geo laouen, hag emañ o leda e gorv du-hont abaoe.

Ar menajer ne gomprens ket mad, med kontant e oa da veza kavet ar wech-mañ eur pôtr ampart ha grêt e oe brao da Fañchig. An deiz warlerh, evid mond da vêsa, e oe lakêt kig dezañ en tu-hont d'e vara amann.

Kuit da goll amzer, e lakeas ar foeter-hent al loened e prad druz ar jeanted. Ken buan all e erruas ive eur ramz brasoh hoaz eged an hini kenta :

— Perag, tamm skribitenn, piou an-neus ôtreet ahanout da lakâd loened da beuri amañ ?

— Ma mamm-you goz...

Eveljust, 'rôg beza tapet gand an oristal braz e oa boest vihan Fañch en e zorn hag ar reunenn elefant war e benn. Hag al loen braz d'ar pôtr braz. Hemañ a ruillas dindan treid ponner egile hag e houzoug a oe paket ha gweet prim ha prim gand an drompill.

— Setu aze, eme ar marhadour, daou gañfard ha ne raint ken aon d'ar vesaerien. Eur bannah sistr hag eun tamm bara am-eus gonezet...

D'an abarde ne oe ket eun druez adarre gweled al loened, ha Fañch a oa sard ive evel pemp gwenneg. Ar menajer hag ar venajerez a zigore o genou war c'hweh eur, dreist-oll pa glevjont e oa bet treh o mevel d'an eil ramz. Keusteurenn vad a oe grêt d'ar baleer-bro, rag kreski eston a rê al lêz gand ar zaoud. Antronoz, e oe lakêt gwinn dezañ er baner.

Memez tra Doue e tremenas an abadenn evel an deizioù all : war-eün e kasas Fañch ar chatal da brad ar jeanted ha neuze e hortozas ar ramz all, peogwir e oant tri vreur. Ma oa braz an daou genta, mabig, hemañ a oa spontuz-tre an tamm anezañ da weled, — n'eo ket braz eo zoken, divent ne lavaran ket, eur penn taro hag eur vouez spouronuz. E oa o paouez gweled korvou e vreudeur ha klask a rê unan bennag da frika ; an dud a wele anezañ a-bell a dremene o gwad en gwelien.

— Piou eo ar pez-ifrontet-se an-neus lakêt e zaout da beuri em frad ?

— Me eo, Fañchig Piti-Boutik, an hini e-neus kaset az preudeur d'an ivern, koz kouele a zo ahanout...

Eur yudadenn skrijuz... Med Fañchig a oa êt da erer, eun erer dispar, en em lakeas da droidella endro da benn ar ramz daoust da hemañ da veza diwriziennet eur wezenn. Gand an daou dôl beg kenta e kouezas daoulagad ar jeant e-pign diouz e benn. Eun tôl beg all drek kokenn e benn ha setu lazet an den brasa a oe gwelet biskoaz, kredapl...

Leun e oa, pell e oa, korvou al loened pa oe echu gand ar foeter-hent da zuna e vannahig gwinn. Mestr ha mestrez ar vereuri a oa o hortoz gweled ar chatal oh erruoud o-unan er gêr. Med

ar pôtr-saoud a oa war-lerh, sonn evel eur pipi hag o c'hwistellad evel boaz :

— Koulskoude on-neus klevet ar ramz braz, emeze...

— Ya, med ne glevot ket anezañ ken, kaset em-eus anezañ da droada, stagit ho loened ha deuit da weled an tri genaoueg o hourvez du-hont.

Ma ! Piou a oe estonet ? Ne dalvez ket ar boan lavared dit, mabig. Goulennet e oe gand ar pôtr-saoud penôz e-noa grêt e gont, med kê da zutal :

— Me eo Fañch an itrikou, a lavaraz hepken.

Pedet e oe, eveljust, da jom da labourad er vereuri :

— Ya da, eme ar baleer-bro, me a zo marhadour diouz ma micher ha tremen poent eo din mond.

Eun dra bennag a oa e klopenn Fañchig Piti-Boutik : felloud a rê dezañ mond d'ober eun tamm tro e kastell ar ramzed a oa aze pelloh war eun dosenn.

Pan erruas eno e oa eur pezh maouez na koz na yaouank oh ober tan dindan eur pikol pod-houarniad soubenn ; ya med, pôtrig, me a gomz dit euz eur pod-houarn... Plas awalh a oa ennañ da lakâd eur vuoh en he fez, ha kazi sur e oa unan e-barz :

— C'hwêz vad a zo gand ho soubenn, itron, eme Fañch, gand eur mousc'hoarz hegarad...

— Feiz ya, c'hoant teus da gaoud eur bannah ?

— Da eo ganin

— Hast buan lonka da skudellad arôg ma vo erru ma fôtred, rag tud têt ha terrupl int, n'ouzon ket peleh ez eont da redeg an drouillez an deizioù-mañ.

E-pad ma oa Fañchig oh eva e zoubenn, e soñje evelhenn :

— Homañ eo eta mamm ar ramzed, mad eo ive kas anezi da weled sant Pêr peotramant eo kap da gaoud jeanted all hoaz... O, itron, kouezet ez eus eur mell tamm huzil er pod-houarn...

Hag hi da furchal gand he gloger ha Fañchig da zond dreg he hein, da dapoud krog en he diouhar ha da stlepel anezi war he fenn er pod. Fañch a zalhas krog mad er golo ahann he-devoe echu ar wraha da ribotad ha beuzet ha devet e oe homañ prim-ha-prim.

— Ha bremañ, eme ar foeter-hent, da biou eo ar hastell-mañ nemed din ? Groom eun tamm tro en diabarz.

Ar gambr kenta a zigoras ar perhenn neve a oa leun a beziou moneiz : dinered, liarded, eur gwenneg, daou wenneg, pemp gwenneg, daou real, pevar real, ha me oar... eun druillad a oa aneze. An eil a oa leun chouk a beziou arhant : lagad-ajened ledan evel an dorn. Fañch a hastas mond da zigeri an deirved kambr. N'ouzon ket petra a oa e-barz ? Peziou aour, pôtr bihan, peziou aour, klevet a rez, ha ken kouch all e oa ar gambr-ze evel an diou all.

Ha lorh e Fañchig peogwir e oa deut da veza pinvidig-mor...

Beva a rê sañset Fañch en e gastell ha brao a rê d'ar beorien diwar-dro, med kred ahanon, mar kerez, derhel a rê gwech ha gwech all da vond da vale bro gand e voestad fardaj. Lavared a reas eun deiz d'am mamm-goz a oa êt da brena spillou koef digantañ :

— Petra fot deoh, Brezidan (1), red eo din pourmen, holen a zo em revr hag hini kraz hoaz...

.....

— Maro eo an tan, ma Nestig, hastom buan mond da gousked.

(1) **Brehed, Berhed** (Brigitte).

"Cocotte"

Ar skolêr yaouank-flamm a oa ahanon, neve erruet e Mur, a veze aliez e fri gantañ e prenestr e gambr... Red eo d'eur pôtr d'an oad-se genaoui eun disterra, « harvoudel » evel ma vez lavaret em Bro-Dreger. Dremmweliou kêr a oa, ha neuze, stok-ha-stok ouz an ti-skol e oa eur vereuri gand eur pezh leur beo-buezeg e-leh ma veze dalhmad unan bennag o vond hag o tond.

Eun dra a gaven iskiz : e-kreiz ar porz e veze peurvuia eur gazeg koz dieub ha diheud o ... huñvreal. Minc'hoarzin a rên o weled an aneval eurveziou-pad a-zao er memez plas, ken difiñv hag eun delwenn pe, er hontrol, o horjellad e benn heb skuiza. Pep hini a rê eur flouradenn dezañ en eur dremen hag a houlenne digantañ :

— Petra emañ o soñjal ' ta, Cocotte ?

Kompren a ris e-noa gounezet al loen-kezeg-se e retred.

Med er vereuri-ze e oa istoh eged eur marh koz, eur plah yaouank a oa ive. Abred e tiskennis euz ma zammig kambr hag ez is da varvaillad gand ar goantenn er zal e-leh ma veze aliez o wriad dirag eur prenestr digor... Me a zo sur he-deus divinet Mari-Annig e oa honnez tintin Suzanna !... Feiz prim awalh e teuas kôziou flour ganim ha ne blije ket dim beza spionet, eveljust... Ahanta, a-greiz-oll e tenvalê ar zal, hanter stouvet ar prenestr gand... Cocotte. Ha ni da c'hoarzin ha da sklokal. Med ar paourkêz koz na rê van ebed. Chom a rê da zelled ouzim gand daoulagad melkonieg hag hanter gousket.

Neuze e oe kontet din oll doareou Cocotte. Jamez ne veze staget hag ôtre he-doa da vond e-leh ma kare. Bemde ez ê heh-unan-penn d'ober eun tamm tro er parkeier he-doa labouret enne e-pad he buez. Lêrez a rê eun tammig melchon en eur penn hag eur garotezenn en eur penn all ha chom a rê da brederia dirag eun toull-karr pe e disheol eur wezenn.

Mond a rê ive da heul ar hezeg all d'ar park. Pa veze mare an arad, e chome aliez an devez-pad gand ar mevel. A-wechou

e kerze keñver-ouz-keñver gand an alar evel ma vije bet staget, med suikza a rê buan hag e vane adarre da zoñjal heb an disterra fiñvadenn. E-pad ma veze ar mevel koz o tebri e damm bara kig sal. wardro deg eur pe beder eur, e plije dezi dond da lakâd he fenn war e skoaz hag e veze eur blijadur klevet an den koz o trailla kôziou d'ar jao :

— Ya, Cocotte gêz, soñj am-eus euz da ebeul kenta ; koant e oa evel an deiz, ha kañfard ! Ya, eur c'hwil, n'eo ket gwir, ma flah ? Hag homañ a oa c'hwezet gand he hini bihan, o hola itron !

Daoust ha kompren a rê al loen ? Damheñvel e tlee beza envorennoù an den ha re ar gazeg peogwir o-doa labouret asamblez e-pad ouspenn ugent vloaz.

**

Pez a dlee erruoud a c'hoarvezas.

A-wechou e heulie Cocotte an hent braz, med ne oa netra da rebech dezi, chom a rê en tu deou, a-rez ar hlazenn. Ha neuze, ne oa ket kement a otoiou eged bremañ ; meur a hini a veze gwelet evelkent o vond da Bondi pe o return.

Eun devez e chomas Cocotte da huñvreal e-kreiz an hent, hag a-dreuz war ar marhad, hanter stouvet ar strêd ganti. Prestig e oe gweturiou d'eun tu ha gweturiou d'an tu all ha tud oh ober chou d'ar baourkêz Gogotenn. Homañ na rê van ebed, pe gentoh, bralla awalh a rê he fenn evid lavared ya, med ne zache ket he revr ganti. Ar hazarn a oa tostig alese ha ne oe ket pell eur blenier o hervel unan euz ar jañdarmed. Hemañ a voutas, a zachas, a skoas war ar paourkêz loen en eur huchal eun hanter-dousennad leou-Doue, med kê da beurbisad... fiñvadenn ebed na reas ar gazeg. Red e oe mond da gerhad he ferhenn, ho tad-koz, bugale, ha klevet a reas hemañ ar gousperou e-kreiz ar zizun, eveljust. Barnet e oa Cocotte baour.

**

Urz a oa da zerhel kloz warni... Kerkoulz e oa neuze krenna he buez dezi dioustu. Degouezoud a reas eur marhadour diouz kozte Rostren gand eur vetaillereñ a-dreñv e wetur-dre-dan. Ha bremañ, kredit pe na gredit ket, bugale, gouela a rê an oll, ha pep hini da bokad d'al loen. Med setu amañ avad eun dra all : Cocotte a ouele ive, peziou takadennou dour o ruillal ouz he daoulagad ; hag he zellou ! Ma pefe gwelet ar zellou truezuz a bare warnom ! Gand komzou flour e oe grêt dezi pignad er vetaillereñ, med eur wech serret an dorrigeñ en em lakeas al loen da wikal... Gouzoud a rê a oa o vond d'ar maro... Rannet e oa or halonou, goulennit digand ho mamm, bugale, hag eñ n'eo ket gwir...

Istor beg-tour Iliz-Veur Landreger

Da oll vugale « Ar Villaj » (Ar Roh).

Deut e oa a-benn an eskob koz da echui e iliz hag an tour, med aze e oa chomet sahet. Nann, nann, nann, ne oa ket posubl dezañ mond pelloh : sevel beg an tour. Re a arhant hag a labour a oa bet goulennet beteg-henn gand ar paourkêz tud.

— Ha koulskoude e vefen bet kontant, eme ar hoziad. Penôz an diaoul e rin ?

— Hola 'vad, me am-eus klevet ma ano dre amañ, c'hwi hoh-eus galvet ahanon, aotrou 'n eskob, eme pôtr e gerniou ?

— Petra emhout o klask endro din adarre, Lusifer ?

— Taoe zo, truez am-eus ahanoh gand daoubennet emaoch evid gouzoud penôz echui an tour, koulskoude n'eo netra d'ober...

— Koz poufer, penôz e rafes-te ? Hast buan mar teus eun dra bennag fur da zistaga, rag c'hwez ar foeltr a zo ganit.

— Setu amañ, eskob Landreger, roit din al labour d'ober, grêt e vo plên, prim ha brao ha ne gousto ket zoken eun diner.

— Ya, pôtr fin, ma roan dit va ine pe ineou all emaoñ karget da gas d'ar baradoz, aze e kahi, Satan !

— N'houlan diganeoh nemed ineou an tammou tud divalo a varvo disul etre an overenn-bred hag ar gousperou.

An eskob santel a oa o vond da zarhoi eur bannah dour benniget war benn Gwill evid ober dezañ skarza, med servijer an aotrou Doue e-neus kavet eun dra bennag :

— Etre an overenn-bred hag ar gousperou e teus laret ?

— Ya, va aotrou madelezuz...

— Ahanta, grêt ar marhad, sach da gillorou ganit ha hast buan echui an tour.

An deiz warlerh beure, pa zavas an eskob evid mond da lavar-red e overenn, e welas an oll Dregeriz war blas kêr o friou gante er vann hag o genouiou digor o selled ouz an tour... an tour echu... eur beg-tour uhel... uhel ha mistr, savet gand mein greuneg

euz ar peb gwella. Biskoaz n'e-noa gwelet an eskob — daoust dezañ da veza bet e Rom — eur hlohdi ken kêr... An dud a oa krog da zañsal gand ar blijadur a oa enne.

Goude e overenn, e yeas mestr an eskopti da gomz gand unan euz e veleien ouz troad an ôter (aze eo diêz d'an Diaoul intent pez a vez lavaret).. Gwelet e oe eur minc'hoarz war o muzellou.

Erru ar zul... Son a ra ar hleier gwas a m'hellont hag an dud a hast etrezeg an overenn-bred, mall gante klevet o eskob o komz euz beg an tour, eun darvoud souezuz ha ne gompren den.

Setu echu an overenn ha grik ebed diwar-benn an tour... Med Petra ma Doue a c'hoarvez, biskoaz kemend-all, a-veh ma 'neus peurlavaret ar beleg an « Ite missa est » ma krog unan all, sonn evel eur heveleg, gand ar gousperou : « Deus in adiutorium meum intende ! »

Klevet e oe neuze trouz ha mesk e foñs an iliz, santel e oe eur c'hwez flêrius, intentet e oe zoken leou-Doue ha darn a welas eur pôtr losteg o skarza er-mêz ken prim ha ma vefe bet tan en e revr... Pôlig ! Pôl Gorneg !

An dud a gomprenas peb tra hag a ganas ar gousperou diouz o gwella, fent gante o weled mousc'hoarz laouen hag evuruz o zamm eskob koz ken speredeg.

G.S. — Ha setu bremañ ar wirionez evid pez a sell ouz Iliz-Veur Landreger. Savet eo bet e-kerz an XIII^{ved}, ar XIV^{ved} hag ar XV^{ved} kantved. Er hantved diweza-ze e oe grêt eur beg-tour plomm, miret beleg 1785. Diskaret e oa neuze ha staga a rêd gand an hini ken meurdezuz on-eus marvaillet diwar e benn hag a oe echuet e 1787. Ar chaloniad a gimmigas 15 000 lur aour hag ar roue Loeiz XVI 20 000. Eñ eta a oe an diaoul madelezuz !

Toenn an Iliz-Veur a oa en plomm ive. E-pad ar Reveulzi, unan euz kuzulierien ruz Landreger a werzas ar metal jonnuz-se hag a zeuas da veza pinvidig, ha tud a beadra eo chomet izili e famill abaoe.

Park Sant Erwan

Da vugale ma mignoned euz Ar Roh.

Dibenn eost pe derou gwengolo. Skolêr yaouank en koñje. Frañsez Perrot goz, perhenn mereuri vraz Kermareg, e Peurit-Ar Roh, e-noa goulennet diganin dond da zikour anezañ da zastum e avalou-douar. Goud a ouien e oa Frañsez eur brezoneger ampart, lennet gantañ « Breiz », kazetenn Erwan ar Moal, e-pad bloaveziou. « Vad a ray din, emon-me, kôzeal gantañ e-pad eun devez war he hed. »

..

Frañsez e-noa kaset e dud da zikour dorna e ti eun amezeg bennag hag edom on-daou endro d'ar patatez, unan o tenna hag egile o tibab.

— Petore ano a vez roet d'an tamm douar-mañ ? a houlennis e-pad ma oam oh ober eur zachadenn war ar voutaillad sistr.

— Hemañ eo park sant Erwan.

— Hola 'vad, park sant Erwan, perag eh-eus hanvet anezañ evelse ?

— An ano-ze a zo kalz kosoh egedon, pôtr kêz, setu pez a vez kontet diwar e benn :

Sant Erwan Helouri, evel ma houzout, a oa o chom du-hont e Minihi, e maner Kervarzin. Petra 'zo ahann ? Eul leo bennag war-eñ a-uz d'ar revier. Te a oar awalh ive e oa ganet mamm sant Erwan amañ, tostig dim, e kenkiz Penn-ar-Hoad, el leh emañ kastell Lone bremañ. Eur c'hoar d'ar zant a oa deut da jom er Henkiz ha plijoud a rê dezañ dond da weled anezi gwech an amzer, war e dreid, en eur lenn e vrevier.

Ar mintin-ze eta, goude e overenn, e-noa kuitê e vaner, tremenet dirag e gouldri a zo hoaz a-zav, ha kemeret ar gwenojennou koant leun a vleuniou a ziskenn d'an ôt. Eur bern a zo aneze, baleet teus dre aze, moarvad. Kêr e oa an amzer. Mousc'hoarz gwenn goulou an deiz a lakê liou an arhant war an neñv. Fresk ha skañv e oa an êr, enni treuz-liviou damhlaz, ha kalon ar zant a oa leun a garantez evid kêrder e Vro Dreger.

Dibabet mad e-noa ar beleg e eur : izel e oa ar mor ha ne oa ebarz an aber nemed dour ar Yeodi. Anavezoud a rez moarvad ar roudour faz-ouz-faz gand revier Pouldouran. Erwan a ra eun tamm troñsa d'e zoudanenn... Amzer da glouka eun istenn pe diou ha setu eñ en tu all war drêzenn Santez-Anna Trogeri. Diou pe deir skrapadenn war an trêz ha setu leun godellou ar beleg a hokouz. Ne advoutas ket ar zant e fri en e vrevier heb rei eur zell d'e vaner ha da vourk Minihi pintet brao war ar grehenn a-uz da vrazter ar vreh-mor en em astenn adaleg koadeler fonnuz a ziskenn euz Tredarzeg da revier Pouldouran beteg douarou pinvidig Mezoubran, du-hont war-du Ar Roh. Meurded ha pinvidigez ! Me a zo sur n'eus ket kalz bravoh er bed oll. Aze emañ evel kalon Bro-Dreger. Goude beza trugarekê Doue evid e oll draou kêr ha mad e chapel ar Veneh-Ruz, Erwan a grasas war-du bourk Trogeri dre an hentou braz ha ledan a vez implijet hoaz ; a-viskoaz ez on bet estonet gand an hentou-ze, koz moarvad evel ar bed. Erfin, erruoud a reas aotrou Kervarzin er hontre-mañ a-dreuz ar parkeier. Hag an dachenn-mañ a oa war e roud evid tizoud hent koz Peurit a dremene stok ouz ar henkiz. Eul lamm dreist ar hleuz... Den er park :

— Evelse e vin kuit da jom da glakenni, eme mab Helouri.

Goude beza trohet berr, e klask kraba war ar hleuz all evid derhel gand e hent. Uhel e oa ar hleuz-se, evel m'eo hoaz... Erwan e-noa tapet krog en eur radenenn gêr a-uz d'e benn... Eun tammig garmadenn ! Malloz ruz ! Eur flipad trohadenn don a oa a-dreuz palv dorn ar beleg hag ar gwad da flista ha da ruillal :

— Koz raden daonet, emezañ, n'oh mad da netra nemed d'ober droug ; ma vefe nemedon e houlfen digand an aotrou Doue skuba ahanoh diouz ar vro-mañ a-bez ; pez a fell din, da vihanna, eo ne vo ken radenenn ebed er park-mañ evid brasa mad an hini a labour anezañ.

Hag ar zant kuit dre an toul-karr en eur chuta e zorn, droug ennañ abalamour n'helle ket derhel da lenn e ofis : ne blijie ket dezañ koll e amzer ! Rag, fidam bié, Erwan ne veze ket ordinal eun den dous, er hontrol, sevel a rê ennañ a-wechou kovadou imor-fall ha neuze ne veze ket na moñs na manouz. Abalamour d'ar si-ze, e vamm he-doa bet poan oh ober eur zant gantañ ; klevet e-teus, moarvad, ar hantig koz-mañ :

« Azo a Genkiz a lere
D'he mab Erwan Kervarzin :
Mabig, emei, noz ha beure,
C'hwî bedo war ho taoulin.
Laret zo din a-berz Doue,
Pa oah bihan, ma bugel :
— Da vab Erwan a vo eun de
Eur zant braz en Breiz-izel. »
« Erwan a c'hoarze e lagad
O klevet e vamm Azo ! »

Paouez a ran rag droug a lavarfen euz or gwella sant,

Hennez a zo da vihanna euz or gwad.
Ha kontant bepred d'e genvroiz d'ober vad.

N'eus ket unan eveltañ !

Ar gêz ne lavar ket piou e-noa klevet ar malloz tôlet gand ar beleg : unan bennag, moarvad, a oa o labourad en tu all d'ar hleuz. Pez a zo sur, pôtr, n'ez eus bet radenenn ebet amañ abaoe ; gra tro ar park ha me a bêo groegon dit ma kavez unan hepken.

Pez a ris, eveljust. Ahanta, m'henn tou, ne welis ket an disterra radenenn ; en tu all d'ar hleuziou a c'hoari an dro d'an dachenn e oa muioh eged nebeud.

Ma ne gredit ket, it da weled eveldon. Allaz, ne gavot ket kennebeud Frañsez Perrot koz, maro eun toulladig bloaveziou zo, Doue d'e bardono.

GERIOU HA TROIOU-LAVAR TREGERIEG

- **charn** : gast, « garn » (g. « carne »).
 - **damañ din** : roit din.
 - **darin a hini (eun)** : unan euz an dibab.
 - **darbodou** : podou, koz podou.
 - **dilliket** : « dégourdi ».
 - **drouillez** (pe : **douillez**, hervez J. Priel), **redeg an drouillez** : merheta, hag ive : « redeg rear » heb abeg.
 - **fakita**, pe **fatika** : sempli.
 - **istoh** (e oa istoh eged eur marh koz) : ouspenn.
 - **kinglañv** : hanter-glañv.
 - **jave**, pe : **javez** : bruched.
 - **kôz** : kontadenn, marvaill.
 - **loukez** : genaoueg.
 - **loull** : divalo, heb talvoudegez (eun den).
 - **Meget din !** = Sell 'ta ! N'eo ket posubl ! (o tond, marteze, euz « Me gred din »).
 - **N'eo ket te lâz, mabig** : Setu amañ eun dra zouezuz, mabig.
 - **Ober sin** (pe : **zin**) : « faire signe » (signal, e gwenedeg), pe : « faire semblant ».
 - **pabienn** (eur babienn) : eur gerezenn.
 - **palankou** : treid palankou : treid braz.
 - **penbouelli (pennbouzelli)** : skei penn evid penn, **pimpoellenni**, « culbuter », « précipiter ».
 - **penton** : baraz, baill.
 - **pimperlamm** : a-druill-drask (J. Priel).
 - **konta lalaig** : « conter fleurette ».
 - **poufer** : brobañser.
 - **sacha ar skasou** : « tirer ses grêgues ».
 - **skilienn**, pe : **skirienn** : keuneudenn, « bûche ».
 - **skribitenn** pe : **skribiton** : eun den a vent izel ha blin da weled (Jarl Priel).
 - **troet da gad** : troet warzu.
 - **todillon, kataill** : trouz ha dizurz.
 - **tost** : piz, sinah ; lavaret e vez ive e Treger : **tagn**.
- N.-B.** — Ar **Z** n'eo ket bet skrivet e « **divouzelloui** » (divouzella), « **pezal** » (eur béel : « une jatte »).

AR BARZIG.

« BRUD » oh adsevel

Eun toullad stourmerien o-deus divizet n'helle ket BRUD chom pelloh a-zav dirag ar skoillou he-deus kavet war he hent abaoe bloaz hanter, hag e vije lakeet da zond er-mêz adarre.

Ha setu an hini genta euz ar peder niverenn a vo embannet e 1964

Perag e oa chomet sahet BRUD ? — Abegou a beb seurt a zo, — hag anavezet mad int gant kement den a labour pe e-neus labourer wardro kelaouennou brezoneg : diouer a arhant, re nebeud a genskoazell, leziregez pe dizeblanted ar re-mañ, enebiez reou all...

N'eo ket renerien BRUD hepken o-deus bet tro da gomz euz prederiou ha trubuilloù ar re a zo e penn ar helaouennou o stourm evid Breiz, — anezo tud dalhmad o klask komananchou, hag arhant all ouspenn ar homananchou, evid pêa o moullerien, — hag a ya ar peb gwella euz o buez da ober pakadou, da adskriva dornskridou, da zifazia amprouennou, hag all... Displeget eo bet e leh all an oll labouriou a gouez war o chouk. E gwirionez, peb niverenn o tond er-mêz a zo eur seurt burzud ha ne c'hoarvez nemed dre ma vez gouestlet d'ar gelaouenn oll amzer eun den pe xaou. Ha pa rank ar re-mañ samma, ouspenn-ze, kargou all, ken ponner, ha pouezusoh hoaz evid an Emzao, êz eo kompren ne dleont ket chom aliez da zihenaoui...

Ne oad ket evid lezel o vond da get eur gelaouenn evel BRUD, a zo he flas merket e-touez an embannadurioù breizeg, dreistoll ablamour d'ar yez yeo ha pobleg a gaver enni. Aze emañ pal BRUD : embann da genta oberennou savet gant skrivagnerien a oar yez ar bobl. An doare-ze a blij kalz d'al lennerien, ha klask a zo bremañ war an niverennou kenta, dre ma kaver enno brezoneg yah, pennadou dezo eun dalvoudegez vraz evid kement hini a zo barreg da zantoud blaz dibar or yez. An oberennou embannet eun nebeud bloaveziou zo en or helaouenn, peziou-c'hoari Per Helias, kontadennou Mab an Dig ha Fañch Inizan, barzonegou Padrig Helen, Dreo Koulouarn ha meur a hini all, a jomo e-touez an traou kaerra bet savet e brezoneg, enno eun doare konta, eun tu da gemer ar vuez ha ne vezont ket kavet e neb leh all ebed.

Setu 'ta amañ BRUD oh adsevel, gouez da vrokusted ar geneiled o-deus sikouret pêa an niverenn-mañ. Evid ar mare, ne vo ket BRUD ken

teo he hoierou ha ma oant kentoh : red eo deom arboella an arhant ha teuler evez war an dispignou.

An taol-mañ e kinnigom d'ol lennerien eun toullad kontadennou euz Bro-Dreger, dastumet ha renket gant E. Ar Barzig, skrivagner eet gantañ ar priz kenta e Kenstrivadeg Emgleo Breiz er bloavez 1962. Soñjal a reom e vezint kavet bourruz hag awechou fromuz da lenn : daoust da lod anezo beza heñvel awalh ouz kontadennou anavezet a-viskoaz, bez ez eus e « Kôziou Tintin Mari » eun dra bennag nevez beb tro, dre ma 'z int bet renevezet gand faltazi on tud koz, hag ouspenn-ze displeget gand ampartiz eur maill a vrezoneger.

Danvez a zo en on armeliou euid meur a niverenn BRUD : danevellou, barzonegou, peziou-c'hoari, pennadou a beb seurt. Ouspenn lodenn al lennegezh, e vo eveljust eun nebeud pajennoù notennoù ha keleier o rei eun diverra euz al labourioù sevenet euid ar Brezoneg. Da betra a talvezfe embann skridoù en or yez, ma ne vije ket stourmet war eun dro euid kreski he levezon war peb tachenn, — ha da genta e spered or henvroiz, — dre ar Skolioù, dre ar Helaouennoù hag ar radio, dre ar C'hoariva, ha dre implij galloud ar Hevredadoù braz a gomz en ano Breiz ?

Setu BRUD o vond war-raog adarre. Gand skoazell strollad he mignoned, e teuo da veza unan euz plijusa, pouezusa hag efedusa kelaouennoù Breiz.

LABOUR EVID AR BREZONEG !

Pennadou e Brezoneg er Helaouennoù

Bian-tre eo al leh roet d'or yez e kelaouennoù Breiz, henn gouzoud a reer mad ! Evelato, abaoe eun daou vloaz bennag e vez gwelet pennadou e brezoneg en eun toullad kelaouennoù sizunvezieg. Bez e tleer menegi, da genta penn, al Liziri a Vreiz a zo bet embannet e-pad tri bloaz gand Per-Jakez Helias e La Bretagne à Paris hag ar pennadou :

Kreisteiz war ma zreuzou, a gaver bremañ beb sizun, en diou yez ive, brezoneg ha galleg, en hevelezh kelaouenn.

Talvouduz kenañ ma 'z eo al « Liziri »-ze e-keñver Lennegezh koulz hag e-keñver Gwerinonezh, adembannet e vint a-strobadou e Brud pe gronnet e stumm eul leor. A-hend-all e tleer meuli ive brezonegerien evel Fañch Danno euid e gontadennou ha barzonegou embannet e Lannion-Républicain, Visant Sêité euid an taolennoù diwar-benn kornioù pe tud vrudet or bro, moulllet e Courrier du Léon, ar fentigelloù ha kentelioù brezoneg roet gand Alan An Diuzet er Petit Bleu. Moarvad e kaver ive embannadurioù brezoneg e kelaouennoù all hag a zo dianav deom : d'ol lennerien da glokaad or roll en eur gas deom skwerrennoù gand eun notennig diskleriadurioù.

Abaoe tri bloaz bremañ e kas beb sizun Emgleo Breiz d'eur ren-kennad kelaouennoù sizunvezieg ha pemdezieg Programou Abadennoù brezoneg Radio-Breiz. Moulllet e vez bremañ ar pennadou-ze gand peder gelaouenn bemdezieg, gand eun deg bennag a hazetennou sizunvezieg ha gand diou all embannet beb eil zizun. Da genta, e veze e galleg an notennoù lakeet da heul titloù brezoneg ar hanaouennoù pe ar pennadouroù-kaoz skignet gand ar radio. Bremañ e vez peurvuia peb tra e brezoneg, nemed en eur gelaouenn bennag euz Naoned pe bro-Wened (a-wechou koulskoude e vez an notennoù e yez Gwened, e kelaouennoù departamant ar Morbihan). Hag e lakeer, goude ar programou, keleier pe eur varnadenn pe eun embann bennag diwar-benn ar radio, an abadennoù c'hoariva, al leorioù brezoneg nevez, hag all... Peurvuia e vez diskleriet eur pemp pe c'hweh ger brezoneg rouez pe dianavezet gand kalzig tud.

Kredi a reom e vez greet eno eul labour kaer euid ar brezoneg, — forz pegen dister eo e-keñver pezh a vije d'ober.

Ha ne vo ket didalvoud, rei amañ dindan eur skwerenn bennag euz ar pennadou a zo bet embannet er mizioù tremenet da heul ar programou :

KELEIER. — Nevez deut er miz : trede moulladur Ar en Deulin, — barzonegou brudet Yann-Ber Kalloc'h. E brezoneg bro-Wened, gand an droidigezh e galleg e-kenver. Eur haer a leor a 254 pajenn (16,50 F).

Dilun 30, da 19 e. 20, war « France-III », pevare abadenn diwar-benn Yezou bian Bro-Hall. Ar zizun-man : An Okitaneg (Yez Oc), gand eun toullad skrivagnerien, en o zouez André Chamson (euz Akademi Bro-Hall). Stourm a ra tud ar Hreisteiz evid divenn o yez, evel ma reom-ni, Bretoned, evid or Brezoneg. (6-X-63)

KELEIER BERR « EMGLEO BREIZ ». — 1. Eul lezenn nevez a zo bet kinniget gand deputeed a beb kostezenn, evid gwellaad kelenadurez ar brezoneg ha yezou ar Hreisteiz er skolioù. Digemeret eo bet an danvez-lezenn nevez-se gand Kevrenn an Deskadurez, Bremañ e tlefe dond dirag ar Gambr. — nemed e savfe adarre ar gouarnamant a-eneb.

2. Dilun 14 a viz here, selaouit 'ta, da 19 e. 20, war « France-III », ar pevare rummad pennadou-kaoz diwar-benn Yezou bian Bro-Hall. Ar wech-mañ : ar Hatalaneg (yez tud ar Roussillon). (13-X-63)

STROLLAD BEILLADEGOU TREGER a zo krog adarre da vond dre ar vro, da zisplega peziou-c'hoari, rimadellou, fentigellou, ha da rei da glevad kanaouennoù brezoneg. Ar goanv-man e vez c'hoariet An diou c'hoar, pezh-c'hoari euz ar henta savet gand Maria Prat, hag Ar Goulenn-Dimezi. Disadorn 23 e vo eur Veilladeg vraz gant ar Strollad, e Tonkedeg, e bro-Lanuon.

A-hend-all, d'an 23 a viz du : Fest-noz e Tregornan (Gronvel), gand Kelh Keltieg Rostren. (24-XI-63)

ANOIOU-BADEZ BREZONEG. — Eur roll anoioù-badez brezoneg, ennañ ousspenn daou-hant ano paotred ha merhed, a zo bet moulet gand « Kelh Sevenadurel Roazon ». Bez e heller diskouez ar roll-ze en Ti-Kêr evid lakaad skriva eun ano-badiziant brezoneg d'eur bugel nevez-ganet. Neb a garfe kaoud ar roll-ze, dezañ goulenn digand : **Kelh Sevenadurel Brezoneg Roazon**, 30, place des Lices, Rennes. — en eur lakaad 35 lur timbr evid ar mizou. (7-XII-63)

FESTOU-NOZ HA BEILLADEGOU. — Digas a reom da zonzj e vo meneget beb sul e-doug abadenn Radio-Breiz, ar Festou-noz hag ar Beilladegou brezoneg a vo dre ar vro ar zadorn pe ar zul goude. Nemed red e vo kas kelou da « Emgleo Breiz » abred awalh : da nebeuta teir zizun en araog. Evelse 'ta, ar strolladou o-devo festou-noz pe beilladegou brezoneg e miz genver a dle kas kelou ar henta ar gwella : d'an 19 a viz kerzu e vo lakeet « er voest » abadennoù ar radio brezoneg evid peder zizunvez. (14-XII-63)

AN AOTROU LOUIS LE CUNFF a zo o paouez beza anvet e penn Radio-Breiz, e Roazon. Ganet en Oriant, L. Le Cunff a gemeras eur perz a-bouez er stourm-kuz, e-pad ar brezel. Brudet eo evel skrivagner evid e leoriou gouestlet, kalz anezo, da vor hag inizi Breiz. Setu bremañ e penn or Radio eur henvroad bet dalhmad aketuz ouz sevenadurez Breiz. Digemer laouen dezañ en e vro hinidig, gand gwella gourhemennou « Emgleo Breiz ». (29-XII-63)

HETOU A VLOAVEZ MAD. — Da genver devezioù kenta miz genver e kas « Emgleo Breiz » e wella gourhemennou d'an oll Vretoned evid

ar bloavez 1964. Ra vo klevet mouez Breiz o houlen ar skoazell he-deus ezomm evid ma ne ranko ket he oll Yaouankizou mond da bell-vro da honid o bara. Red eo e ve savet dre aman staliou-labour e-leiz, ha roet eun diazez startoh d'al Labour-Douar ; red eo digeri skolioù nevez hag implij yez ar vro evid kreski an Deskadurez. Red e vo seveni e 1964 promesa al Lezenn evid Breiz. (5-I-64)

AR BREZONEG E « PELLWELEREZ » ROAZON. — Eur blijadur eo bet da zellerien TV Roazon, disadorn diweza, gweled war o skramm bian Charlez Ar Gall, rener Abadennoù brezoneg ar Radio, hag ouz e glevad o rekete deom ar bloavez mad. Perag ne vije ket evelse en TV eun toullad skeudennou gand brezoneg d'o heul, beb sadorn, beb eil sadorn da nebeuta ? — Deoh-c'hwil, lennerien, da houlen an dra-ze, en eur skriva raktal d'an R.T.F., e Roazon. (11-I-64)

Eun toullad mad a heriou nevez pe nebeud anavezet a zo bet diskleriet da heul ar pennadou.

Setu amañ, da skwer, ar gerioù bet roet o ster e galleg, e-pad ar zizunvezioù diweza :

Keneil ; — achantour ; — mojenn ; — sevenadurez-pobl ;
Taolenn ; — Ster-Aon ; — er barh (ar barz) ; — telenn ; — c'hoariva ;

Chikolodenn ; — ar wask ; — fentigell ; — skeudenn ;
Strollad ; — laz-seni ; — koroll ; — kelh ; — sevenadurel ;
Geriadur ; — krennlavar ; — barzoniez ; — stourm-kuz ; — gouestlet ; — kenvroad ;

Hetou ; — diougan ; — Laruen ; — ar girin ; — diembann ; — seveni ;

E koun ; — krugell ; — Lamber ; — digabellet ; — pense ; — pellwelerez (TV) ; — skramm bian.

War a glevom, e plij kenañ d'an dud an nebeud diskleriadurioù a vez roet evelse, koulz lavared beb sizun. Meur a her ha ne oant anavezet nemed gand al lenneien a dremen beb eun tammig er yez voutin.

Kenstrivadegou-Skol

XIved KENSTRIVADEG YANN-SOHIER (O.L.S.B.)

« Oberenn al Leoriou-Skol Brezoneg » (Skolaerien ha Kelennerien Ar Falz) a ginnig ar bloaz-mañ da vugale ha tudou yaouank ar skoliou dindan-Stad an destenn-mañ da heul evid sevel eur pennad-skrud e brezoneg :

AL LOEN GLOAZET. — Kavet ho-peus eun aneval gloazet, war eun hent, e-barz eur park pe eur hoad : ki, kaz, labous, loen gouez...

Penaoz e oa ? Petra oa c'hoarvezet gantan ?

Petra ho-peus greet ? Petra eo deut al loen da veza ?

KRENNLAVARIOU. — Ma anavezit krennlavariou diwar-benn al loened — loened donv pe gouez — skrivit anezo dindan ho pennad pe war eur folenn zistag.

An destenn roet da vugale Bro-Wened a zo :

EL LON MAHAGNET (pe : GLOAZET). — Kavet hou-pes ul lon mahagnet, ar un hent, barh ur park pé ur hoed : ki, kah, labous, lon goué...

Penaoz é oè-ean ? Pétra oè arriù geton ?

Pétra hou-pes groeit ? Pétra éma deit el lon de voud ?

Peder gevrenn a vo evel kustum er Henstrivadeg hervez oad ar genstriverien hag ar skol a zarempredont.

Roet zo brud d'ar Henstrivadeg dre ar helaouennou, dre ar radio hag en eur gas an destenn en oll skoliou. Bez e heller goulenn pape-riou ar Henstrivadeg digand « Oberenn al Leoriou-Skol Brezoneg », 6, rue Neptune, e Brest.

Klozet e vo ar Henstrivadeg d'ar 15 a viz ebrel : ar skridou a zo da gas d'ar chomleh amañ a-uz (O.L.S.B.).

KENSTRIVADEGOU AR « BLEUN-BRUG ».

Embannet eo bet gand ar « Bleun-Brug » al leorig o rei danvez e Genstrivadegou evid 1964.

Ouspenn al Lenn brezoneg, e vo konkourioù Kanaouennou, Displegadennou, Tresadennou hag eur Henstrivadeg Pennadou-skrud diwar-benn an Divroa e Breiz.

Morse n'oa bet niverusoh Kenstriverien ar « Bleun-Brug » eged e 1963 : ospenn 2.500 anezo, ken na oa bet ranket kroui kreizennou nevez evid o barn. Rannet oa bet en tu-all da 4.000 lur a brizioù kenetrezo.

Kement a verz a raio Konkourioù ar bloaz-mañ.

Evid kaoud leorig Konkourioù ar « Bleun-Brug » e 1964, — skriva d'an Ao. Le Louz, 4 bis, rue Colbert, e Brest.

C'hoariva

Etre an 20 a viz here hag ar 14 a viz kerzu, Strollad Beilladegou Treger e-neus bodet ospenn 2.000 den e-doug ar c'hwec'h Abadenn bet roet gantañ e Pleuveur-Gaoter, Landreger, Plouagor, Tonkedeg, Plouillo ha Tregastell. Goude ar gouelioù dibenn-bloaz, kroget o-deus adarre kanerien ha c'hoarierien B.T. da vond koulz lavared heb sadorn da noz a barrez da barrez dre Vro-Dreger : goude Pluvur ha Landrelleg-Plouillo, mond a raint da Louanneg, da Blistin, da Zant-Alar-Plouagad, da Logivi-Plougraz, ha moarvad, diwezatoh, da Bomerit-Jodi, da Blouvouskan, da Blouared hag all, — nemed e tigouezfe amzer yen, evel warlene, kleñvejou pe darvoudou all da harz outo kas penn da benn ar raktres bet merket evid ar goañv...

Ar bloaz-mañ, ospenn kanaouennou ha rimadelloù evel boaz, daou bez-c'hoari a vez oh ober lodenn brasa Abadennou B.T. : Da choaz etre diou c'hoar, savet gand Maria Prat, euz Berlevenez, — hag Ar Goulenn-Dimezi, renket diwar Tehekov.

Eun dlead eo rei gourhemennou d'ar c'hoarierien, akuit evel tud a vicher, eur brezoneg dispar war o muzelloù ospenn : Maria Prat ar gemenez skrivagnerez, Tinaig Perch, Andre Guyomard, Yann Gouronnec, Erwan Pichon, Ann Bourdonnec (ha kentoh : Denise Urvoy).

Meuleudi a-zoare a dleer ive da gonterien, kanerezed ha kanerien ar Strollad : Ifig Droniou, Ifig Urvoy, Yann Derrien, Amédée Prigent, Javonne Broudic, meur a hini euz c'hoarierien ar peziou-c'hoari, ha d'ar re a vez o tiskleria ar c'hoari d'ar zellerien : Bernard An Ny ha rener ar Strollad, Fañch Danno.

Eul labour efeduz kenañ evid ar brezoneg : unan euz ar brava ha talvoudusa strivou bet greet biskoaz evid lakaad ar vrezonegerien da hrizoud o yez ha sevenadurez o bro.

Labour euz ar henta a vez greet ive, e bro Kastell-Paol gand Strollad Beilladegou-Leon, renet gand an Ao. Kerouanton.

Eur strollad all a c'hoarierien a anavezet e Kerne-Izel ha ne dremen sizunvez ebed koulz lavared heb na yafe du-mañ du-hont da zisplega daou pe dri euz an deg bennag a beziou-c'hoari herr desket ganto e brezoneg.

E Kerne-Uhel, n'eus ket bet gallet adober, da geñver nozvez Gouel-Yann 1963, an taol kaer a oa bet tizet ober ar bloaz araog, e-doug nozveziad Kala-Hañv war Venez ar Glujiri, e Plevin-Treogan, gand strollad Groñvel : ne oad ket deut a-benn da gaoud e poent ar zonerez evid Marheg an Nevez-Amzer. N'eo ket dilezet ar mennad evelato, rag berz kaer a oa bet greet da Zorser Gouel-Yann P.-J. Helias, e 1962, gand ar mil den deut war ar menez.

Ar pezh a ra diouer atao eo eur strollad c'hoarierien damvicherel o c'hoari peziou braz or skrivagnerien vrezoneg. Marteze e tizo heb re a zale breuriez ar « Gomedianed Vreizeg » renet gand Yann Moign lakaad en e zav ar C'hoariva-Pobl-ze emaint e soñj kroui. Diskouezet o-deus o ampartiz warlene o tisplega evid ar wech kenta Gurvan Tangi Malmanche, e galleg : n'o-deus ket brasa c'hoant nemed gelloud dond a-benn da c'hoari peziou seurt-se e yez ar vro.

« EMGLEO BREIZ »

O skriva da rener an deskadurez e Bro-Hall

Embannet eo bet war La Vie Bretonne eul « lizer digor » kaset gand Emgleo Breiz da Vinistr an Deskadurez e Bro-Hall, da rei da weled d'an oll penaoz e naher, e gwirionez, rei e blas d'ar brezoneg er Gelennadurez :

— E 1961, e-neus ar gouarnamant harzet ouz an danvez-lezenn a-du gand kelenn ar brezoneg, an okitaneg hag all da zond dirag ar Parlamant.

— Ar promesaou greet gand an Ao. Paye e 1961, forz pegen dister e oant, n'int ket bet sevenet. Setu daou vloaz ma 'z eus bet lavaret e vije renket taolenn-labour eur helenner e Kemper, evitan da helloud kelenn ar brezoneg e meur a glas euz liseou ar gêr-ze, — ha n'eo ket bet kemmet netra evid hoaz !

— N'he-deus ket teurvezet Komision Hall an UNESCO respont da halvadenn Kuzul ar Yezou bian e Bro-Hall, a houlenne he skoazell evid poueza war ar gouarnamant d'henn lakaad da heulia ar reolennou digemeret en darn vrasa euz ar broiou all e-kenyer ar yezou minoriezel.

— Nahet e-neus an Ao. Fouchet e-unan seveni goulennoù ar 1.500 Liseaned vraz ha Studierien o-doa pedet anezan, dre hantererez ar C.E.L.L.B., da ober kalz gwelloc'h evid kelenn ar brezoneg eged ar pezh a heller ober beteg breman.

— N'eus bet respont ebed digand Mererez an Deskadurez d'ar hinnig greet gand Kuzul ar Yezou-bian, o houlenne ma vije dalhet eur hendalh-studi, dezant stumm eun « Daol-Grenn », gouestlet da gelennadurez ar brezoneg, ar yez Oc, an euskarad hag all...

Diskredig e chomer eta e hellfe an eil zanvez-lezenn aozet ha digemeret gand Komision an Deskadurez er Gambr anavezoud eur blanedenn dishenvel ouz hini 1961.

An eil danvez-lezenn-ze a zo bet studiet gand an Ao. Barniaudy, ha bez e kaver ennan ar peb gwella euz kinnigou an Ao. Ao. Bayou ha Bayle evid astenn kelennadurez ar « yezou-rannvro » ha rei dezo talvoudegezh en oll arnodennou. Koulskoude, en abeg da enebiezh an Itron Ploux, kannadez Bro-Gastellin, n'e-noa ket getlet an Ao. Barniaudy lakaad ar Gomision da vond a-du gand ar pezh a ginnige, gand skoazell lodenn vianna ar strollad-studi-ze, diwar-benn ar « yezou-rannvro » er Vachelouriezh hag an Aotre-kelenn (Lisans).

Kevredigezh etrevroadel ar yezou ha zevenadureziou en arvar

Nevez krouet eo bet eur Gevredigezh Etrevroadel evid divenn ar Yezou hag ar Zevenadureziou en arvar.

Diskleriet eo bet ar Gevredigezh hervez lezenn e Bro-Helvetia, dindan an ano : « Association Internationale des Langues et Cultures Menacées » (A.I.L.C.M.), — hag en he fenn eman an Ao. Pierre Naert, yezoniour ha kelenner Skol-Veur e Bro-Suomi.

Pal ar Strollad nevez a zo labourad da zelvel ar yezou lakeet en arvar gand ar stourm renet outo gand gouarnamantou ar broiou ma vezont implijet.

Kendastum a ra an A.I.L.C.M. ar strolladou sevenadurel o pledi gand divenn ar yezou en argoll. Klask a raio dreistoll ar Gevredigezh Etrevroadel poueza war ar gouarnamantou, war an organadurioù evel an UNESCO, evid ma vo kelennet ar yezou dalhet breman er-mêz ar skolioù hag evid ma vo roet dezo al leh a zere er mererezh hag er vuez pemdezieg.

Dre hantererez « Kuzul Yezou bian Bro-Hall » eo bet « Emgleo Breiz » unan euz ar strolladou o-deus roet he diazez d'an A.I.L.C.M., gand an I.E.O. (Skol-Veur ar Studiù Okitanad) hag « Ikas » (Kevredigezh sevenadurel euskarad). Eun toullad bloaveziou zo edo an I.E.O. hag « Emgleo Breiz » o prienti krouidigezh eur seurt Kevredigezh Etrevroadel. Dibabet e oa bet he sevel e 1962 gand asant an Ao. Naert, e-noa roet lans d'ar mare-ze d'eur « Goulennadeg » Kelennerien Skolioù-Meur broiou Hanternoz Europa o klask skoazell ar Huzulioù evid an UNESCO evid divenn ar yezou bian chomet heb beza kelennet. Edo an Ao. Naert o labourad diouz e du evid lakaad en he zav eur Gevredigezh Etrevroadel.

En hanv-man, e-doug bodadenn-vloaz « Kuzul Yezou bian Bro-Hall » e oa kaset eur halvadenn d'an Ao. Naert, o fizioud ennan ar garg da ziskleria ha da ren an A.I.L.C.M. — Bez e oa dileuridi « Emgleo Breiz » er vodadeg-se, dalhet e miz gwengolo e La Ciotat, e Bro-Brovans.

Sekretour an A.I.L.C.M. evid Bro-Hall a zo an Ao. A. Delfau, o chom e « La Vinha », e Moularès (Tarn).

Chomleh an Ao. P. Naert a zo : Humlegardsgatan 16/B/97, Abö, Bro-Finland.

AR BREZONEG O HONIT EUN TAMMIG TACHENN

Abaoc ar 27 a viz here, e vez bremañ skrignet Abadenn Vrezoneg Radio-Breiz, d'ar zul, war eun dro gand postou Roazon-Thourie ha Kimerh. Kentoh, ne veze skrignet gand Roazon nemed diou wech ar miz, ha d'al lun, da 18 eur, da lavared eo d'eun eur ma ne helle ket an darn vrasa euz ar zelaouerien beza dieub euz o labour... Eur gonit eo kaoud an abadenn beb sul, war Dhourie, d'eun eur deread awalh (gweloh e vije bet, koulskoude, ma vije bet diouz an noz). Eur gonit bian all eo kaoud an deg vunutenn a zo bet roet adal an 20 a viz here : padoud a ra bremañ an abadenn etre 13 eur 20 ha 14 eur.

Setu 'ta daou boent tapet euz taolenn-goulennou **Emgleo Breiz**. Anaoudegez vad a zo da gaoud ouz ar C.E.L.I.B., — « **Kreizenn Studi ha Kevrea Gwirio Breiz** », — e-noa lakeet e Gomision ar Greskidigez da studia kudenn ar radio brezoneg, hag a oa bet kaset gantañ dileuridi da weled Ministr ar Heleier e Pariz, e miz gouere diweza, da zisplega ar goulennou kenta a oa da veza sevenet war an dachenn-ze.

An « tamm » all da gaoud bremañ a vije eun Abadenn div eur beb eil miz, da skwer, diouz an abardaez, evid gelloud rei da glevad d'ar vrezonegerien peziou-c'hoari braz hag oberennou all, ha n'eus ket bet tu o displega beteg-henn dre ar skingomz.

War evez e tleer cham avad, rag kement a zo bet roet deom a hellfe beza lakeet en arvar adarre gand ar hemmou a c'hoarvez aliez awalh e urziadur abadennou ar skingomz, war urziou Pariz.

Ahend all, eun dlead eo lavared aman pegen plijet eo bet an oll vrezonegerien o klevad brezoneg en TV, evid hetou bloavez mad Renerez an « R.T.F. », da genta, ha da geñver kelouenn genta « skinwelet » ROAZON-BREIZ, d'an 3 a viz c'hwevrer. Laouen e vezer pa weler zo deut eur Rener e Roazon Breiz dezan ar youl da rei d'ar brezoneg, endra m'e-nevo galloud d'ober, eul leh deread d'or yez er bellwelerz kenkouz hag er skingomz. Trugarez a-greiz kalon d'an Aotrou L. Le Cunff.

Ken laouen all e vezer pa grog eur gelaouenn vraz evel « **QUEST-FRANCE** » oh embann beb sadorn, abaoe ar 1^a a viz c'hwevrer, en e vualladurio euz « Penn-ar-Bed » hag euz « Aoteier-an-Hanternoz », eur pennad e brezoneg hag e galleg, savet gand P.-J. Hélias, an hini a gaver d'ar gwener e « **La Bretagne à Paris** ». Kas a ra « **Bud** » e starta gourhemennou da renerien « **QUEST-FRANCE** » ha d'or heneil.

Leoriou embannet

gand « **EMGLEO BREIZ** » e 1963

BILZIG, advoulladenn oberenn vrudet Fañch AL LAY.

Eul leor 264 pajenn, ment 16 × 24 cm., ennañ skeudennou e-leiz gand Fulup AR GOUAILL ; gand eur rollad gerioù diskleriet, da heul ar romant.

Al leor : 12 lur ; dre ar post : 13 lur.

MIRZIN-MIRZINIG : eur marvaill euz an XIII^{ved} kantved, kontet ha skeudennet gand SAMIVEL, lakeet e brezoneg gand J. ABASK, embannet gand skoazell an « **Tad Kastor** ».

Evid ar vugale ; skeudennou e meur a liou.
2,50 lur ; dre ar post : 3 lur.

LE BRETON PAR L'IMAGE : leor evid deski ar brezoneg, gand Visant SEITE, — skeudennou e-leiz, gand J.-J. SEVELLEG.

Al leor : 5,50 lur ; dre ar post : 6 lur.

(O vond gand al leor : eur bladenn embannet gand Skol dre Lizer ar Bleun-Brug).

KOMZOM, LENNOM HA SKRIVOM BREZONEG, — eil lodenn Leor-deski an Dr. J. TRICOIRE. — Kaerra leor studi bet moulet evid studi or yez : 230 pajenn e daou liou, gand eun niver braz a skeudennou savet gand J. TROTREAU. Da veza embannet : pladennou da vond gand ar henteliou, evel ma 'z eus bet o vond gand Lodenn genta al leor.

Al leor : e gwerz e ti ar varhadourien-leoriou, ha gand Embannadurio Emgleo Breiz : 18 lur.

Nevez embannet :

Dr J. TRICOIRE

**“ KOMZOM, LENNOM
HA
SKRIVOM BREZONEG ”**

(Eil Lodenn)

Evid deski ar Brezoneg
gant skoazell pladennoù

18 F

dre ar post : 19,50 F

Skriva da : “ EMGLEO BREIZ ”

B. P. 17 - Brest

Kas an arhant da : Editions F. C. B.

B. P. 17 - Brest

C. C. P. 164-907 Rennes